

12

ISTORIOU
TENNET EUZ AR SKRITUR-SAKR
gat an Tad BERTHE, Redemptorist,
LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

NAONTEKVED LEORIK :

PROFED
NAZARETH



NEUVILLE-SOUS-MONTREUIL
IMPRIMERIE NOTRE-DAME DES PRÉS



Imprimerie Notre-Dame des Prés. — Ern. DUQUAT, directeur.
Neuville-sous-Montreuil (Pas-de-Calais.)

ISTORIOU

TENNET EUZ AR SKRITUR - SAKR

gat an Tad BERTHE, Redemptorist,

LAKEAT E. BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

NAONTEKVED LEORIK :

PROFED
NAZARETH



NEUVILLE-SOUS-MONTREUIL

IMPRIMERIE NOTRE-DAME DES PRÉS

APPROBATION DE MGR LAMARCHE

ÉVÊQUE DE QUIMPER ET DE LÉON.

ÉVÊCHÉ
DE QUIMPER
ET DE LÉON

Quimper, le 25 mars 1892.
En la Fête de l'Annonciation
de la Sainte Vierge.

IMPRIMATUR.

CH. LELEUX, Vic. Cap.

Arras, 23 Avril 1892.



Cher Monsieur le Curé,

Les Récits Bibliques du R. P. Berthe, Rédemptoriste, obtiennent un grand et légitime succès. Ce sont des résumés substantiels et admirablement faits de l'Histoire de l'Ancien et du Nouveau Testament.

Vous avez eu la pensée et je vous en félicite, d'en faire bénéficier notre pays Breton qui y trouvera un complément très utile du beau livre *Testament Coz ha Testament Nevez*. Je ne puis donc que vous encourager grandement à poursuivre votre excellent travail de traduction, qui, pour une part très sérieuse, servira les intérêts de la Foi et de la Langue Bretonne dans notre pays.

Croyez, cher Monsieur le Curé, à mes sentiments d'affectueuse estime et d'entier dévouement.

† THÉODORE, Évêque de Quimper et de Léon.



PROFED NAZARETH

I.

IANN VADEZOUR.

TREGONT vloaz a ioa abaoe m'oa apparisset an eal d'ar belek Zakarias. Ar blaveziou-ze a ioa bet blaveziou a freuz ag o doa kasset d'an traon rouantelez Juda. Pa varvas Herodes, he vap Archelaus a bignas var an tron, mez ker fall oa ma na zaleas ket an Impalaer August d'hén diskar ha da staga rouantelez ar Judee ouz stajou Rom. Setu pobl koz Abraham, David, Salomon hag ar Makabeed deuet da veza e sklavaj dindan ar baianed. Ar Juzevien o devoa miret c'hoaz eun nebeud feiz a gave eur merk eno, hervez komzou Jacob, edo tostik amzer ar Messias. Studia a reont ar skridou sakr ha dreist-holl komzou ar profed Daniel : « Seiz sizun ha tri-ugent a dremenno' var ar bobl ha var ar gear zantel araok

ma vezo fin d'ar pec'hed, ma vezo an injustiss effasset, ma tispako ar justis eternal ha ma vezo sakret gat an oleo sakr Sant an holl Zent. Beteg ar C'hrist-Roue, e vezo nao zizun ha tri-ugent hag e kreiz an dekved e paouezo an offrans hag ar sakrifiks. »

Hogen, er penn-kenta euz ar renkad diveza-ma a vlaveziou, e redas ar brud e Jerusalem e zoa apparisset eur profed nevez var ribl ar Jourden. Tiber a ioa impalaer abaoue pemzek vloaz. Herodes Antipas a c'houarne ar Judee, hag he vreur Philipp an Ituree. Anna ha Kaïfas a ioa beleien vraz er blavez-se. Dioc'h lavar an dud a ioa d'he velet ha d'he glevet, n'en devoa evit guiskamant nemed eur zae great gat reun kanval ha stardet en dro dezha gat eur c'houriz ler ha ne zrebe ken boued nemed killeien-raden hag eun nebeud mel gouez dastumet er guez kleuz pe e goask ar reier. Epad an noz, en hem repue en unan bennak euz a gavarnnou ar menez hag eno; dre ma tremene an tigred hag al lergn gouez e kreiz an denvalijen. Iann evel guechall Elias a vennige Jehovah. Eur baro hir ha kaer a zouge evel an Nazareaned; morse an aoten n'oa bet kuezet varnhi. He vleio flour a goueze beteg he ziskoas, hag a roe c'hoas eun ear rustoc'h d'he vizaj uzet gat ar iuniou hag ar beillou.

Den ne ouie euz a be leac'h e teue : Ne c'houiet nemed ar pez a lavare ar bastored koz euz ar menez. Kounta a reant en devoa Doue roet d'ar belek Zakarias eur bugel mirakuluz hag e zoa tremenet traou burzuduz en deiz m'oa bet sirkonsiset. Goudeze, a lavarent-hi, ar c'hrouadur a dec'has en dezert, eb ma ve klevet komz anezha abaoue. Doue,

marvad, en doa great euz ar c'hrouadur-ze hebrofed, hag hen marteze eo a zelviro Israël.

Map Zakarias hag Elisabeth oa e guirionez : ha digasset oa gat ar Spered-Santel evit prezek ar Mesias. Ar boblou-ze a c'hortoze eur Roue euz a berz Jehovah; mes Iann a brezege dezho rouantelez Doue : « Grit pinijen, emezha, rak tost eo rouantelez an Env. » Lod a c'houlene digatha petra oa, petra a felle dezha ober. Respount a rea var eeun : « Me eo an eal a gomz anezha Isaias digasset da zressa an hentchou evit an Hini a dle dont. Me eo ar vouez a gri en dezert : Digorit hentchou d'an Aotrou ha kompezit he venojennou. An draonien a vo karget, an duchen a vo diskaret, an hent-treuz a vo eeunet, an hentchou garo a vezo douseat, ha neuze kement den a zo beo var an douar a c'hello gueleat ar Zalver digasset gat Doue. »

Euz kement korn a ioa er Judee hag er Galilee e teue tud, a vanden, da Vethabara, var ribl ar Jourden. Rak eno Iann a brezege a greiz he galoun d'an holl evit konvertissa ho c'halounou hag ho frepar da rouantelez Doue. An dud-se gounezet gat he gomzou birvidik a skoe var ho feultrin, a govessea ho fec'hejou hag a ziskenne er ster evit reseo ar vadiziant. Ar profed a zoube anezho en dour evit merka evel-se oant purifiet euz ho fec'hejou hag ar re-ma goudeze a zistroe d'ar gear gat ar fizians vraz oa tost an Hini a dlie beza ho Zalver. Nak a Juzeo, en eur zistrei da Jerusalem goude beza klevet ar profed, a lavare ennha he unan pa vele eur zoudard romen bennak : « C'hoaz eun nebeud dervezio, hag ar gear zantel ne vezo ket sotret gat an dianvezidi. »

Da heul ar bobl, an doktored hag ar re vraz ne zalejont ket ken nebeud da vont beteg ar Jourden. E c'hellit kredi n'oant ket kalz douget evit ar prezegez-ze n'oa ket bet er skol gatho hag a ouie dre he gomzou birvidik gounit ar bobl pe prada an dud hypocrit pe techet-fall. Euz an dud vraz-ma a iea d'ar Jourden, eur rumm, ar Pharisianed, tud rust da velet, a vire eb mank an disterra gourc'hemen-nou euz al lezen, evel en hem voalc'hi, iun... Hogen leun a istim evitho ho unan hag a zisprijans evit ho nessa, morse n'o deus gellet kompren ema ar zantelez guirion er galoun ha ne ket en traou a-zianveas. Ar rumm all oa ar Saduseaned, ouenn dud diskredik ha douget d'ar plijaduriou. Ar re-ma ne gredent ket e vev an ene c'hoaz goude ma vez dispartiet diouz ar c'hôrv. Daoust n'oant ket mignouned d'ar Pharisianed, gouskoude en hem lakejont a unan evit diskar galloud ar profed. Dioc'h an ear anezho ker rok ha ken disprijuz, Iann a velas dioc'h-tu oant guir vugale ar Juzevien kaledet-se a laze kannaded Doue :

« Ouenn aeret-viber, emezha, piou eta en deus lavaret d'eoc'h diouall oc'h ar reuziou ema brema souden an Aotrou Doue e vont da zigass deoc'h. Grit eta eur binijen vad ha diouallit da lavaret evel digarez : « Ni or beuz Abraham evid tad. Rak me her lavar deoc'h : Euz ar vein-ma Doue a ell tenna bugale da Abraham. Nan, nan ; ar vouc'hal a zo var grizien ar vezen ; kement guezen ne zougo ket a frouez mad a vézo trouc'het ha taolet en tan. »

Ar Pharisianed a voubennas. Petra oa eta ar galouper-broioù-ze evit komz ken divergont ouz bugale ar batriarched, ouz doktored Israel ! Ne fel-

las ket dezho plega dirak mignoun Doue. Distrei a rejont da Jerusalem, gat-ar zonz en ho c'haloun da ober eun dro fall bennak d'ar Badezour-ze en doa kredet ho gourdrous. Mez ar bobl a zelaoue he vouez hag a lavare d'ar profed en eur ouela :

« Petra dleomp-ni da ober evit terri koler an Aotrou ?

— An hini en deus diou viskamant, ra roio unan d'an hini n'en deus nikun. An hini en deus bara, ra rei evel-se ive. »

An dra-ze a ioa lakaat an houarn ruz var ar gouli : rak drouk braz Israël oa an avarisdet. Ar Publicaned, da lavaret eo ar re a douche ar guir hag an taillou, a binvidikea aliez dre laeronsiou, dre injustissou. Ar re-ma a c'houlennas ive petra dlient ober evit reseo ar vadiziant :

« Bezit leal, a lavar Iann, ha ne c'houlennit netra dreist ar c'hargou a zo dleet. »

Eun dervez, e velas deuet beteg enna ha zoudarded a vije e tioual an templ. Hi, ive, en despet da veur a dech fall a c'houlenne pardoun hag a bede ar profed da lavaret dezho penaoz beva iviziken :

« C'hui, emezha, diouallit da gaout trouz entrezoc'h, da damal e gaou ha ne c'houlennit nemed ho pae » — E nebeud amzer e seblantas ker braz dirak ar bobl ma kemerent anezha evit ar Messias e unan.

« An Hini a deuio var va lerc'h-me, emezha, a zo brassoc'h egethon-me : n'oun ket din da zilassa dezha he voutou. Me ho padez en dour ; mez Hen ho padezo er Spered-Santel hag en tan. Her gueleat a ran : Ar c'hant (c'hrouer) a zo gatha en he zorn. Ema e nizat al leuriad. Ar greun mad a zastum en

he c'hriñol hag ar c'holo a daol en eun tan a ne vougo biken. »


Kaer en devoa lavaret, kredi a reat oa hen ar Messias. Setu conseil braz ar Juzevien, aliet gat ar Pharisianed, a gass beteg ennha kannaded, beleien ha levited, evit goulenn digatha euz ho ferz piou oa, ha petra en devoa da ober. Iann n'en doa nemed eur gomz da lavaret hag ar bobl a-bez a gemere anezha evit he roue. Respount a reas dezho gat guirionez ha lealded : « Me n'oun ket ar C'hrist » — « Ak Elias oc'h-hu ? — Nan — Ak eur profed oc'h-hu — Nan — Piou oc'h-c'hui eta ; rak ni a ranko kass respount d'ar re o deus hon digasset ama. Petra livirit ac'hanoc'h oc'h unan ? »

« Eur vouez ouñ ag a gri en dezert : kempennit an hent d'an Aotrou ! »

« Perak eta e vadezit ma ne d'oc'h nak ar C'hrist, nak Elias, nak eur profed ? »

— Guir eo e vadezan en dour ; hogen eun all a zo en ho touez a ne anavezit ket hag en devezo he vadiziant kalz muioc'h a nerz eget va hini-me. Dont a rei var va lerc'h. Em raok edo gouskoude ha n'oun ket din da zilassa dezha he voutou. »

Kannaded ar Sanhedrin a zistroas da Jerusalem, drouk-kountant dre n'o doa ket gellet tenna he zekret digat Iann-Vadezour. Mez peb hini a lavare : « Petra vezo eta ar Messias, ma zeo guir profed ar Jourden ne ket din da zilassa dezha he voutou ? »



II.

JESUS A NAZARETH.

TOST da vloaz a ioa abaoe m'edo Iann e krial d'ar bobl edo erru ar Roue braz, pa ziblassas euz a Nazareth evit mont beteg ennha, var ribl ar Jourden. An den santel Iann n'en devoa morse her gullet. Eur vech, eken, epad m'edo e pedi dirak an Holl-Galloudek, e klevas eur vouez euz an Env o lavaret dezha : « An Hini a veli e tiskenn hag e repoz varnha ar Spered-Santel eo an hini a elumo he vadiziant eun tan divin. »

Hogen d'ar c'hoec'h a viz genver, e touez eun niver braz a dud a ioa en dro dezha, Iann a velas en eun taol eun den a n'oa ket anavezet hag ar guel anezha a lakeas he galoun da dridal. Er me-mez amzer eun dra bennak a lavare dezha en he spered edo eno an hini a c'houlenne abaoe keit amzer. Mont a ra d'en hem deuler ec'harz he droid ; mez Jesus dija, evel pa vije bet eur pec'heur, a c'houlenne digatha ar vadiziant.

« Aotrou, a lavaras Iann en eur greña, d'in-me eo goulenn ar vadiziant hag e fell deoc'h hen reseod diganen !

« Ia ; me a fell d'in, a respountas Jesus, hag evel-se e virimp peb justiss. »

Hervez ar justiss, ar Verb en hem c'hreat den evit pec'hejou ar bed, a dlie beza great dezha evel d'ar bec'heurien. Jesus eta a ziskennas en dour hag an dour-ze a resevas digatha ar vertuz da barea an eneou. Pa deuas er meaz euz ar ster hag epad ma pede var an teven, an Env a zigoras, ar c'hoabr a ioa skeduz hag ar Spered-Santel, dindan furm eur goulm, a deuas da repoz varnha. Neuze ive e klefchot e tiskenn euz an Env ar c'homzoù dudiuz-ma digasset gat Doue an Tad. « Hema eo va map muia karet hag ennha em euz lakeat va holl joa. »

Ar Messias, sakret gat an daou fersoun all euz an Dreinded, a ell brema mont da brezek he aviel. Iann Vadezour n'en devoa mui netra da ober nemed diskuez d'ar bobl, map Doue, ar Messias. Mez d'an abardaez-se memes, poulzet gat ar Spered-Santel, Jesus a dec'has dioc'h ster ar Jourden evit en hem denna er gouelec'h. Eno dre ar iun hag ar beden, en hem laka e doare da brezek ha da zavetei an eneou.

Diou leo dioc'h ster ar Jourden, e kreiz dezert Jericho, e sao eur menez leun a reier ha n'eus ket varnha an disterra glazder. Daouzek kant troatad huelder en deus a-zioud an tuchennou a zo en dro dezha. Ne eller pignat varnha nemed dre hentchou striz ha danjeruz. Var kozteziou ar menez, vardro anter ar c'hreac'h, e veler meur a gavarn, ledan zo-ken, hag o deus evit moger peziou kerrek spountuz. En unan euz c'havargnou-ze oue kasset Jesus gat ar Spered-Santel.

E douk daou-ugent dervez e chommas eno eb

dribi tam. Beva a rea, he unan, pell diouz an dud, gat an anevaled gouez, al lergn, al leoparded. N'oa nemed ar seurt loened-se da c'helloud darempred eur vro ken digonfort. Pell dioc'h trouz ar bed, Jesus a bede eno evit an dud oa deuet da brena. Setu souden dirazha eun adversour ag a ioa abaoue pell amzer var glask dezha.

Satan he unan oa, prins an diaoulou. Abaoue m'en doa diskaret Adam e baradoz an douar, oa roue ha mestr var an dud kuezet e stad a bec'hed. Gouskoude n'en doa ket gellet ankounac'haat komzou Jehovah : « Eur vaouez hag he map a vruzuno did da benn. » Ar sonj-se a roe dezha nec'hamant ha klask a rea anaoud ar map-se da Adam a dlie save-tei he lignez, evit her c'holl, mar gelje, evel m'hen doa kollet Adam. Pa velas Bugel Bethleem, ar miraklou great en dro d'he gavel, he vertuziou dispar, he furnez dreist he oad, e sonjas ervad e c'helle ar c'hrouadur-ze beza ar Zalver. Hogen ar pezh a velas var ribl ar Jourden a roas dezha da gredi muioc'h mui oa ennez ar Messias, ha raktal e lakeas en he benn tenti ar personaj-se. Evel en devoa great guechall e chardin Eden, en hem zilas goustadik e kavarn Jesus a ioa neuze dare gat an naoun.

« Mar doud map da Zoue, emezha, lavar d'ar vein-ze chench e bara. »

Hag en eur gomz evel-se, e tiskueze da Jesus mein round evel bara, evel ma tiskuezas guechall da Eva ar frouez difennet. Jesus a respountas ker kaer ha tra :

« An den ne ket gat bara ebken e vev, mez gat pep komz a deu euz a c'hinou Doue. »

Pa vel ne ell ket her gounid dre ar c'hov, Satan hardiz evel eun diaoul, a zoug Jesus betek ar beg huela euz templ Jerusalem.

« Mar doud map Doue, emezha adarre, en hem daol en draoñien. Rak skrivet eo e tigasso Doue he Elez da zougen ar Messias etre ho daouarn, evit ne stoko ket he droad ouz eur mean bennak. » — Skrivet eo ive, a respountas Jesus, ne dentoc'h ket an Aotrou ho Toue. »

Satan, e kounnar, a zogas neuze Jesus var gern ar menez. Ac'hano, keit a mac'hellet guele, e tiskuez dezha holl rouanteleziou an donar. « Kement-se holl a roin d'id, emezha, mar keres daoulina dirazhon ha va adori. »

Pa glevas Jesus an diaoul e c'houlen digatha traou ken euzuz, e reas varnha eur zell ag a oue evintha evel eun dalm gurun. Er c'hass a reas divar he dro en eur lavaret :

« Kea kuit, Satan; rak skrivet eo : adori a ri an Aotrou da Zoue hag hen ebken a zervichi. »

Satan a ziskennas d'an ivern da guzet he vez hag he arraj. Evel ne elle ket dont a-benn euz an adversour-ze dre gaer ha dre finessa e touas her lakaat d'ar maro.

Neuze an env a zigoras a-nevez. An Elez a dos-teas ouz an Hini a ioa bet treac'h d'an diaoul hag a bourveas a bep tra ho mestr hag ho Doue.

Deuet oa evit Jesus ar poent d'en hem ziskuez d'ar bed. Kuitaat a ra an dezert hag e tistro d'al leac'h m'edo Iann e rei he vadiziant. Hema a ioa e tiviz gat eul loden euz he ziskibien, pa velas hor Zalver e tont varzu enno :

« Setu, emezha, oan Doue. Setu an Hini a zoug

var he ziskoaz holl bec'hejou ar bed. Anezha eo e meus lavaret deoc'h : « Unan a deu var va lerc'h hag a ioa em raok. Me n'hen anavezen ket ha gouskoude evit rei anezha da anaoud da Israël, e zoun deuet da vadezi en dour. Hervez m'en doa lavaret d'in an Aotrou Doue, e meus guele ar Spered e tisken hag e repoz varnha. Ia ; her guele am euz ha renta a ran testeni e zeo map Doue. »

Gouskoude diskibien Iann a gare kement ho mestr, ma n'oa kaoz gat hini anezho da vont da heul Jesus. Antronoz, Iann a ioa gat daou anezho pa dremenas adarre Jesus. Hen diskuez a ra adarre evel en derc'hent hag e lavar : « Setu aze oan Doue » En dro-ma, an daou ziskib a ioa gantha a zo gounezet d'ho mestr nevez.

Jesus a boursue he hent a-ed ar Jourden. Kerkent a ma velas oa tud oc'h he heul, e tistroas outo hag e lavaras d'an daou zen iaouank : « Piu a glaskit ? » Ar re-ma a c'houlennas digatha e pe leac'h edo e chomm, evel tud ag o devoa c'hoant da zivis gatha. « Deuit ha guelit » a lavaras-hen dezho hag ho c'hassas d'he di.

Pardaez oa. An daou ziskib a dremenas-an noz er c'hornik distro en doa kemeret Jesus evit he lojeiz. Goude beza bet komzet gat Jesus epad pell amzer e lavarjont dezha oant prest da vont d'he heul hag e zoa mall gatho gounid diskibien all. Euz an daou ziskib benniget-ze, unan a ioa Andre he hano, map da Jonas, pesketaer euz a Vethsaïd ; an eil oa Iann, map da Zebedee, ginidik euz a Gapharnaüm. Ho daou o doa tremenet ho buez var lenn ar Galilee pe var ribl ar Jourden. Ho daou oant eat da heul Iann Vadezour kerkent a ma zoa en hem

lakeat da brezek. Andre en devoa eur breur hanvet Simon, diskib da Iann evel dha hag a dlie beza e labourat tostik ac'hano. Mont a ra buhan d'he glask hag e lavar dezha ker laouen ha tra : « Ni or beus kavet ar Messias. » Kerkent Simon a ioa e c'harz treid ar Mestr. « Simon, map da Jonas, a lavar dezha Jesus, iviziken e vezoc'h hanvet *Sephas*, da lavaret eo mean pe roc'h. » Ar pesketaer ne ouie ket neuze perak oa roet dezha al leshano-ze. Hogen Jesus a vele dija an iliz a vije savet var ar me-an-ze.

Antronoz, Jesus a gerzas varzu ar Galilee gat he ziskibien nevez. En hent, e kafchont Philipp, gimidik euz a Vethsaïd evel Per hag Andre. Jesus a lavaras dezha : « Deuit d'am heul. » Ar gomz-se a ieas doun en he galoun. Mont a reas d'ar red da di unan euz he vignouned, hanvet Nathanaël, a gavas gourvezet dindan eur vezen fiez. « Kavet or beus, emezha, ar Messias. Jesus eo a Nazareth. — Hag eun dra bennak vad a ell dont euz a Nazareth, a lavar hema en eur vousec'hoarzin ? » Gouskoude evit plijout d'he vignoun e za varzu Jesus hag edo tostik dezha pa lavaras ar Zalver d'ar re a ioa en dro dezha : « Setu a-ze eur guir Israelit, eeun a galoun hag eb troidellerez. » — « C'hui n'am anavezit ket, a respount Nathanaël ; penaoz e c'hellit-hu va barn ? — « Me a meus ho kuele dindan ar vezen fiez araok m'oac'h bet galvet gat Philipp. » Dioc'h ar c'homzou-ze, Nathanaël a velas dioc'h-tu edo dirak an Hini a oar peb tra. « Mestr, emezha, c'hui a zo e guirionez map Doue ha Roue Israël. »

Goude tri dervez bale, e c'herrujont e Cana, ke-riadennik paour mez koant euz ar Galilee, en eur

famill euz ho anaoudegez ag a ioa gathi fest eureud. Mam Jesus a ioa bet pedet ive d'ar banket. Hogen, epad ar pred, ar guin a deuas da vankout. Mari dre druet ouz an dud keiz-se, a deu da gaout Jesus hag a lavar dezha var eun ton glac'haret. « No deus mui a vin. — Maouez, a respount Jesus, petra glaskit diganen-me ? Va heur n'eo ket deuet c'hoas. » Mari n'e lavaras ket eur ger muioc'h. Mez abalamour e c'houie e devije he feden avanset heur an Aotrou Doue, e lavaras d'ar zervicherien : « Grit kement a lavaro deoc'h. »

E sal ar fest e zoa c'huec'h pod mean hag a iea ennhio n'ouzor ket pegement a zour. Jesus a lavaras d'ar zervicherien ho c'harga a zour ha goudeze e lavaras dezho : « Kemerit brema er podou-ze ha kassit da eva da vestr ar fest. » Hema pa danveas euz an dour-ze troet e guin, eb gouzoud euz a be leac'h e teue, ne ellas miret da ober kompliment, da rei fouged'ar goaz nevez : « E leac'h all, emezha, e vez gortozet fin ar pred evit rei da eva ar guin disterroc'h pa ne c'hell ket mui an teod blassaat : Mez c'hui o c'heus servichet ar guin guella da ziveza. »

An diskibien a ioa leun a joa. Divezatoc'h, d'ar iaou-amblid, azezet ouz eun daol all, e velint ne deo ar mirakl-ma nemed eur skeuden euz eur mirakl estounussoc'h c'hoas great gat karantez Doue, er zakramant euz an Aoter.



III.

AR PROFED ER JUDEE.

PA oa deuet ar poent evintha da brezek d'ar bobl, Jesus a guiteas Nazareth, keriaden-nik kollet e kreiz ar menezioù, evit mont da jomm da Gapharnaüm, var ribl lenn Jenesareth.

Capharnaüm, a ioa eur gear darempredet kalz hag eun niver a hentchou braz a iea dreizhi. Eno e rea eun ehan marc'hadourien an Armenii hag ar Mezopotamii, bandennou beajourien Damas ha Babylon, an troumplou a Rom pa zeant da Zamarii pe da Jerusalem. Capharnaüm oa, e guirionez, ar gear genta euz ar Galilee d'an neac'h, a veze leshanvet Galilee an holl broiou. Jesus, diskennet euz an Env evit prezek ar virionez, a ioa eno evel e kreiz an holl boblou.

Etre pemzek hag ugent mil den a ioa er gear-ze, eb kounta eun niver a dud estren a deue di da dremen eun nebeud amzer abalamour an ear ennhi a ioa douss hag ar vro a ioa koant. Ar re-ma a zave manerioù bihan var an tuchennou tro-var-dro. E traoñ ar gear goantik edo lenn Jenesareth. C'huac'h leo e doa a hirder ha teir a ledander. An dour ennhi a ioa sklear ha divesk ha bemdez e velet varnhi gat ho lien guenn ouspenn pemp kant bag peske-

terez, deuet euz keriadennoù Bethsaïd, Corozain, Magdala ha Dalmanutha.

Petra bennak ma rea konvers gat millierou a baianed, ar Galileaned divar bord all lenn a ioa chommet fidel da Zoue ha d'ar Messias promettet. Beva'reant dianken dioc'h ho fesketeriez hag ho labour douar, da c'hortoz ar rouantelez nevez en devoa prezeget dezho Iann-Vadezour. Bez e zoa, evit guir, e Capharnaüm evel e Tiberiad, er c'hresteiz d'al lenn, Pharisianed ha doktored ourgouilluz. Mez n'ho doa ket gellet c'hoaz koll ar bobl se eeun ha leal. Jesus a dlhe eta kaout eno tud vad da zelaou he gomzou hag eul leac'h d'en hem repui e ken kaz e safche trouz en he enep.

Ar Pharisianed ne ellint ket miret da zevel en he enep ar pennou braz euz a Jerusalem ha zo-ken Herodes-Antipas, gouarnar ar Galilee d'an neac'h hag ar Syrii, map da Herodes koz ha ker fall ag hen. Mez neuze Jesus n'en devezo da ober nemed treuzi ar Jourden evit beza e stajou Philipp ha gortoz eno an heur merket gat Doue he dad.

Jesus a goumans neuze he vision dre Jerusalem hag ar Judee. Evel ma tostea gouelioù Pask, e zeas gat he ziskibien, hag assamez gat eun niver braz a belerined, d'ar gear zantel a Jerusalem. Pa eruas en templ, e velas eun niver a dud oc'h en hem oualc'hi hervez ma zoa merket el lezen; lod all a zave ho zeltou var an huel; ar pennou tiegez a brene oaned evit ar sakrifiks. E diabarz an templ zo-ken, leur pe blass ar baianed a ioa evel eur c'hoc'hi. An drafferien, a nebeudou, en hem zilas en diabarz gat ho c'houlmed, ho ejenned hag ho oaned. Ar veleien a ioa a unan gatho.

An trafikerien arc'hant a ioa ive eno gat ho zao-liou evit rei d'an dud a ziaveas mouniz ar vro hag an anter-sikl a renket da baea da denzor an templ. Diviz ha disput a reat eno ker ouaz a var eun dachen foar.

Jesus a ieas drouk enna pa velas profani evel-se an templ. Evel-mestr, e ro urz d'an trafikerien da baouez ho c'honvers en templ abalamour e zoa eun dishenor evit ti Jehovah ha ma virent ouz ar belerined da bedi. Evel na reant van evit he glevet, e kemeras eur skourje, eur fouet, hag e kassas er meaz ejenned, oanet hag ho mistri, pilat a reas an taoliou hag e lavaras d'ar re a ioa e verza koulmet : « Kassit an traoù-ma ac'han ha ne rit ket euz ti va zad eun ti a gonvers. »

D'an ampoent-ze, he zaulagad a lugerne evel eur c'hlaouen elumet gat Doue ha tress eun Doue a ioa varnha. An holl a anaveze edo eno e ti he dad hag en doa guir da gomz evel ar mestr. Ar varc'hadourien a dec'has spountet : Mez ar Pharisianed a c'houlenne etrezho petra oa d'ar Galilean divergont-se ober he vestr en templ ha tamall ar c'hustumou o devoa aotreet.

« Ma oc'h eus bet karg digat Doue, emezho gat imor, da ober ar pezh oc'h eus great, diskuezit-hen deomp dre eur mirakl bennak. »

« Dismantrit an templ-ma, a lavaras dezho Jesus en eur gomz euz he gorr, hag a-benn tri dervez me zavo anezha adarre en he za. »

« Penaoz, emint-hi, (rak no doa ket komprenet komzou hor Zalver) c'huoc'h vloaz ha daou-ugent a zo bet dister evit sevel an templ-ma ha c'hui a zavo anezha e tri dervez ! »

Mont a rejont kuit ; mez Jesus a vele mad e zoa kassoni en ho c'haloun. Var evez bepred razho, e chommas e Jerusalem evit holl goueliou Pask hag e reas eno kalz miraklou. Evel-se kalz tud a gredas enna hag en ho zoues eur Pharisian hanvet Nicodem, doktor euz al lezen hag unan euz a gonsaillerien braz ar Sanhedrin. Ar pezh en devoa gullet Jesus e c'hobera verkas dezha sklear e teue a-berz Doue.

Mez petra' ioa etre an artizan-ze a Nazareth hag ar Messias a ioa galvet, hervez falz kreden bugale Israél, da veza ar roue braz, mestr d'an holl rouanez ? Evit gullet sklear, Nicodem a deuas en noz da gaout Jesus. Hema a roas dezha da anaoud mister rouantelez Doue, rouantelez spirituel ag a renker evit beza enna renevezet dre ar vadiziant : « E guirionez, emezha, den ne dei e rouantelez Doue nemed genel a rafte a-nevez euz an dour hag euz ar Spered-Santel. »

An doktor en devoa bolontez vad. Selaou a rea piz komzou hor Zalver hag hema a lavaras dezha c'hoaz. « Doue en deus kement karet an dud ma hen deus roet evitho he Vap unik. An nep piou bennak a gredo enna ne varvo ket, mez en devezo ar vuez a bado da viken. Mez ive, an hini ne fello ket dezha kredi, a zo dija barnet. Rak guelloc'h e kar an denvalijen eget ar sklerijen abalamour he oberou a zo fall. » Ar Pharisian ne ankounac'heas ket an nozvez-se nak ar c'henteliou kaer en devoa bet digat Jesus. Divezatoc'h ne vanko ket da ziskuez he feiz.

Goude goueliou Pask, Jesus a dennas varzu ar Jourden, a dreuz meziou ar Judee. Evl ma zoa en dro dezha eun niver mad a ziskibien ha ma roe, ne

ket mui badiziant Iann, mez sakramant ar vadi-
ziant, mignouned touet Iann-Vadezour, douget-holl
evit ho mestr a deuas da flatra dezha Jesus.

« Ar Jesus-ze, emezho, goude testeniou ker kaer
o c'heus rentet anezha, a deu dre ama brema da
vadezi evel doc'h hag an holl a ia d'he gaout. »

« A ne moa-me ket lavaret deoc'h, a lavar Iann,
n'oan ket ar C'hrist ? Ar C'hrist eo an ozac'h ; -an
dud-se a ia beteg enna eo ar pried ; ha me, mi-
gnoun d'an ozac'h, a zo leun a laouenidigez. Red
eo dezha kreski ha d'in-me bihanaat. An hini a
gred e map Doue en deus ar vuez eternal : Mez an
hini ne gred ket, koler Doue a jommo savet a ziou-
tha da viken. »

Setu ar c'homzou diveza euz ar vouez-se a oa
bet klevet epad bloas var ribl ar Jourden. Mez Doue
a felle dezha e vije an hini a ioa bet e tigeri hent
da brezegennou ar Messias, ar c'henta ive e tigeri
dezha hent ar verzerenti. En amzer-ze, Herodes,
dre he vuez fall ha libertin a ioa eur skouer fall
evit an holl Galilee. Goude beza kasset kuit he
bried lejitim, e timezas, en despet da lezennou
Doue ha da lezennou an dud, d'he nizez Herodiades
a ioa greg he vreur Philipp. Epad ma zoa fest braz
e maner Macheronte, er Peree, Iann-Vadezour a
ieas dirazha hag a lavaras dezha grounss : « Roue,
ar pez a rit a zo eun torfed. » Herodes en devoa
aoun n'hen dije savet ar bobl en he enep. Gat si-
kour ar Pharisianed, e lakeas he baka var douar
ar Judee hag he deuler e prizoun Macheronte.
Ac'hano, mignoun an Aotrou Doue ne roas mui a
enkrez d'ar roue libertin Herodes, na d'ar Phari-
sianed trubard.



IV.

AR PROFED ER SAMARII.

PA oue lakeat Iann-Vadezour er prizoun,
Jesus a zalc'has he blass var ribl ar Jour-
den epad eun nebeud miziou. Ar Juzevien
a deue kement anezho da zelaou he gom-
zou, ma teuas e berr amzer da gaout muioc'h a
ziskibien eget ar profed. Setu petra' lakeas drouk-
kountant ar Pharisianed. Jesus a anaveze ar va-
liss o doa outha hag a ieas dioc'h-tu etrezek ar
Galilee. Hogen tremen a reas dre ar Samarii, aba-
lamour en doa aoun rak Herodes. Ar Samarii, eil
departamant braz euz ar Palestiin, a iea adalek ar
mor Meditteranee beteg ar Jourden hag a zispartie
ar Judee dioc'h ar Galilee. Eur vro diskoumpes oa,
leun a veneziou, goloet a goajou, a viniennou, a
vez olivez gant meziou ha foenneier pinvidik ;
koulz lavaret eur baradozik kollet, siouaz ! abaoe
mil bloaz gat ar schism hag an idolatri. Ar Sama-
ritaned o devoa savet var menez Garizim eun templ
ker kaer hag hini Jerusalem hag o devoa taolet a
gostez an holl leoriou sakr nemed leoriou Moïses.
Setu perak ar Juzevien n'oant ket evit ho gouzaññ.
Morse ne deant en ho bro, ha pa renkent tremen

dreizhi e zeant affo, hag eb goulén an disterra sikour digat ar schismatiked fall-ze.

Jesus n'en devoa outho nep kassouni; he galoun zo-ken a ioa leun a drugarez. Goude beza kuiteat ar Jourden ha treuzet traonien gaer Jericho, e zeas gat eul loden euz he ziskibien, da baka an hent braz a ia euz a Jerusalem da Nazareth dre ar Samarii. Da berñ eun nebeud derveziou bale, e velas ar gear goz a Zichem, etre menezioù bepred brudet Hébal ha Garizim. Tost da gear e zoa eur puns ag en devoa Jacob digoret guechall evit he famill hag evit he loened. Goude kement a gantvechou blavezioù, e c'hanvet anezha ato puns Jacob. Ar mestr divin, skuiz gat an hent hir en doa great dindan eun heol béro, a azezas var bord ar puns, epad ma zea he ziskibien e kear da brena bevans.

N'oa ket pell amzer oa eno e tiskuiza, pa erruas eur vaouez euz Sichem da gerc'het dour. A veac'h e doa guelet an estranjour, ma c'hanavezas ervad e zoa euz ar Judee. Setu perak e zeas var eun d'ar puns da garga he fod eb lavaret eur ger. Hogen Jesus a gomzas outhi da genta :

« Maouez, emezha, roit d'in da eva. »

« C'hui a zo Juzeo, emezhi mantret, hag e c'houlennit diganen-me dour da eva, me gouskoude Samaritanez ! »

Jesus a lavaras dezhi gat eur vouez karantezuz :

« O maouez, mar gouezfec'h an donezon kaer a ra Doue d'an dud, mar gouezfec'h piou a c'houlén diganeoc'h da eva, e c'houlennfec'h oc'h unan peadra da derri ho sec'hed hag e roffe deoc'h dour a vuez. »

« Aotrou, a lavar ar Samaritanez mantret, n'o c'heus pod ebed hag ar puns a zo doun. Penaoz, mar plij, e c'helloc'h-hu punsa an dour beo-ze a gomzit anezha. Daoust eta a c'hui a ve brassoc'h eget Jacob, hon tad, en deus roet da eva d'he loened ?

— An hini a evo euz an dour puns-ma, eme Jesus, en devezo sec'hed c'hoaz goudeze. Hogen an hini a evo euz an dour a roin dezha, biken mui n'en devezo sec'het. Ennha e vézo eun eienen hag a darzo bepred. »

Ar Zamaritanez a zelaoue ar c'homzou-ze ; mez n'ho c'homprenne ket. Gouskoude doare hor Zalver a blijas kement dezhi ma kredas lavaret dezha : « Aotrou, emezhi, roit d'in eta euz an dour-ze evit na mezo mui sec'hed ha ne rankin mui dont ama da gerc'het dour. »

Deuet oa ar poent da skei varnhi eun taol pounner. Var digarez ar privilaj a c'houlénne beteg ar re a gare, Jesus a lavaras dezhi mont da glask he goaz.

« Me ne meus goaz ebed, a lavaras-hi dijipod. — « Mad aoualac'h a livirit, eme hor Zalver ; n'oc'h eus pried ebed. Pemp goaz oc'h eus bet hag an hini a vevit brema gatha ne ket ho koaz eo. En eur gomz evel oc'h eus great n'oc'h eus ket lavaret gevier. »

« Aotrou, a lavar ar Samaritanez er meaz anezhi he unan, guelet a ran ervad e zoc'h eur profed. Kelennit ac'hanon. Hon tadou o deus a bep amzer adoret Jehovah var ar menez-ma Garizim. Perak eta c'hui, entrezoc'h Juzevien, e rit euz a Jerusalem ar gear Zantel, al leac'h ma tleat mont ennha da adori ha da ginnig ar sakrifs ? »

Jesus a zispakas dirazhi ar virionez penn-da-benn.

« Maouez, emezha, kredit ac'hanon. An heur' zo prest da zini na adoroc'h an tad na var ar me-nez-ma nak e templ Jerusalem. Beteg-henn, c'hui a adore ar pez ne anavezec'h ket. Ni a anaveze Doue hag a ouie e vije deuet ar zilvidigez euz a Juda. Dont a rei an deiz, pe evit lavaret guell, gou-laouet eo an deiz ma c'hadoro, guir vignouned Doue, e spered hag e guirionez.

— Ia, gouzoud a ran e teui a benn-nebeud ar Messias, ha neuze e tesko deomp pep tra.

— Maouez, a lavar Jesus, ar Messias a c'horto-zit eo me eo, an hini a zo e tiviz ganeoc'h ! »

D'ar moment-se, an diskibien a ioa distro dioc'h kear hag a oue mantret e velet ho mestr e komz gat eur vaouez. Daoust a ne c'houie ket ne dle ket eun den fur, hervez an doktored na saludi eur¹⁶ vaouez, na komz outhi na dreist holl diviz gathi dirak an dud ? Gouskoude dougen a reant dezha kement a resped ma ne lavarjont ger. Ar Samaritanez, strafillet, a lezas he fod e kichen ar puns hag a i eas d'ar red dre gear da gounta d'an holl ar pez a ioa c'hoarvezet gathi.

« Deuit da velet, a lavare-hi, an den-ze en deus lavaret d'in kement a meus great em bues. A son-jal a c'hellit-tu ne ve ket ennez ar C'hrist, e maoump var c'hed dezha ? »

Ar bobl, a vanden, a i eas da gaout Jesus, gat ar greden oa ar Messias, estranjour puns Jacob.

An dud-se, gat ho feiz displeg ha didroidel, a bedas ar profed da jomm en ho zoues. Jesus a ze-laouas ho feden hag a i eas da dremen daou zervez

e Sichem, evit komz dezho euz rouantelez Doue. Goude beza klevet hor Zalver he unan ar Samari-taned a lavare d'ar c'hreg :

« Brema ne ket var ho testeni-c'hui, e kredomp enna. Her c'hlevet or beus gat hon diskouarn ha gouzoud a reomp ervad e zeo Salver ar bed. »

Eürussoc'h eget ar Juzevien, ar c'heiz schisma-tiket-ma, kazi idolatred, no devoa ket en ho zoues doktored ourgouilluz evit trenka ho spered hag ho c'haloun. Pedi a rejont Jesus da jomm gatho ; mez Jesus a dlíe da genta en hem rei da vugale Israél. Goude daou zervez e zeas adarre en hent etrezek ar Galilee.





V.

AR PROFED ER GALILEE.

AR Galilee a ioa rannet e diou loden : ar Galilee d'an neac'h, braz ha ledan, goloet a veneziou, etre al Liban, ar mor Mediterranee hag ar Jourden, a ioa hanvet Galilee ar Jentiled. Rak eno paianed, Syrianed, Greked, Romaned, Phenisianed a ioa abaoe pell amzer mesket gat bugale Israël. Er Galilee izela, etre ar mor ha lenn Jenesareth ne oa, koulz lavarret nemed Juzevien. Eno e velet menezioù brudet ar Jelboë, an Hermon hag an Thabor, e kreiz etre traoñiennoù pinvidik, peuri druz, koajou guez huel hag eost puill. Setu a ze perak e zoa bet savet eno ouspenn daou-c'hant kear pe geriaden ; hag ar rezisterra anezho o devoa etre dek ha pemzek mil den.

Pa zeas er vro-ze da brezek he aviel, Jesus a rea ar pezh en doa profetizet Isaias : « Douar Zabulon ha Nephtali, hent ar mor en tu all d'ar Jourden, Galilee ar Jentiled, ar bobl azezet en denvalijen, en deus gullet eur sklerijen vraz. An deiz a zo savet var an dud a ioa sebeliet e skeud ar maro. » Great oue da Jesus ar c'haerra digemer.

Abaoe goueliou Pask, n'oa ken kaoz gat an dud nemed divar benn profed Nazareth, divar benn ar burzudou en doa great e Jerusalem ha dreist peb tra dre m'hen doa kaset an trafikerien er meaz euz an templ. D'an deiziou gouel, ar bobl a deue a-bez er synagog, el leac'h ma lavare Jesus dezho komzou Doue. « Grit pinijen, a lavare-hen evel Iann-Vadezour, ha kredit d'an aviel, tost eo rouantelez Doue. »

Epad ar veaj-se, e c'herruas eun deiz e kichen Nazareth, ar bourkik en doa tremenet enna he vuez betek an oad a dregont vloaz. Daoust ma c'houie e vije great digemer fall dezha gat he genvroiz, e fellas gouskoude dezha kass dezho ar c'helou mad euz an aviel. D'ar zadorn oa. Mont a reas d'ar synagog hag assamez gantha he ziskibien.

Goude mo devoa an holl kemeret ho flass ha goude ar c'hantikou kanet da c'hloar Jehovah, belek ar synagog a roas al leor sakr da lenn da Jesus. Jesus a zigoras al leor el leac'h ma oar chomet a-za er vech-all, hag a lennas ar c'homzou-ma euz a leor Isaias :

« Spered Doue a zo varnon ; rak sacret en deus ac'hanon gat an oleo santel. Va digasset en deus da brezeg an aviel d'ar paour, da barea ar c'hallounou melkoniet, da zigass d'ar re a zo er prizoun an delivrans ; d'ar re zo dall, ar sklerijen ; d'ar re a zo e poan, konsolasion ; d'an holl Jubile an Aotrou, deiz ar rekompans solanel. »

Goude ma veze lennet eun nebeud euz al leor, ar belek pe unan bennak euz doktored al lezen, a deue d'her lakaat sklear ha diroufen dirak ar bobl. En dro-ma eo Jesus a felle d'ar bobl klevet. An holl, an

daoulagad e para varnha, a ioa e klask kompren penaoz e vije en hem dennet ac'hano an doktor-ze nevez eat euz he stal kalvez. Jesus ne oue ket ne c'het. Komz a reas d'an dud-se evel eur mestr. Sevel a ra he vouez hag e lavar ar c'homzou-ma :

« Ar pezh a zo-merket e leor Isaias hag a zo bet lennet brema, a deu da zeveni hirio en ho touez. »

Goudeze e tislèg an eil var lerc'h eben komzou ar profed ha diskuez a reas dezho sklear e zoant divar benn ar Zalver. Spered Doue a zo diskennet var an Hini a dle kass ar c'helou mad ; an dud humbl a resevo grassou Doue, ar bec'herien ar pardon ; hag evel-se ar re a zo e sklavaj dindan an drouk-spered a vezo lakeat e liberte. Ar blavez santel a zo digor ; ar Messias a zo deuet ha rouantelez Doue a zo e vont da veza savet.

He gomzou, sklear ha kalounek, a iea bete guele an eneou. Mez, e leac'h anzaou ar virionez, an Nazaritaned o devoa evel mez dirak ho c'henvroad.

« Goude tout, emezho, daoust a n'eo ket hennez map ar c'halvez Joseph. Anaout a reomp Mari, he vam, hag he gerent Jacques, Joseph, Simon ha Jud. E peleac'h effen bet e paka kement a zeskadurez hag a c'halloud. N'eo bet morse e skol ebed.

Jesus a vele an disprijans o devoa evitha e guele ho c'haloun.

« Guele a ran, emezha dezho, e fell d'eoc'h lavaret d'in komzou ar proverb koz : Medesin, en hem bareit da genta oc'h unan. Grit en ho pro evit para ar re glañv ar miraklou oc'h eus great, var a lavarar, e Capharnaüm. C'hui a zo ken diskredik ma tiskuezit eur vech c'hoas n'eus ket eur profed ag a ve digemeret mad en he vro. Evit ar mira-

klou, sonjit ervad e zoa en amzer Elias kalz intanvezet en Israël en amzer ar gernez spountuz a a guezas var ar vro ha gouskoude ar profed ne oue kasset da nikun anezho, mez da eur vaouez euz Sarepta, e touez ar Sidonianed idolatr. Ha c'hoaz, ne vanke ket a dud lor en Israël en amzer Elisee, ha gouskoude nikun anezho n'oue pareet, mez Naaman ar Syrian. »

Ar c'homzou-ze ker guir, an istoriou-ze ken estounuz, e leac'h plijout da dud Nazareth, o lakeas da vont en egar. Sonjal a reant n'en doa map ar c'halvez evitho nemed disprijans hag e plije muioc'h dezha ar Jentiled. En ho c'hounnar e tenjont anezha euz ar synagog evit he stoleja e meaz kear ha bete kern ar menez. Ac'hano, pevar ugent troatad dioc'h an douar, edont e vont d'hen teuler d'an traon pa ouent evel seizet gat eun dorn ha ne velent ket.

Jesus a dremenaz dre greiz ar bobl, dispount ha dinec'h hag a dec'has dioc'h ar gear fall-ze evit distrei da Gafarnaüm.

P'edo e tremen dre geriadennik Cana, el leac'h m'hen devoa chenchet dour e guin, eun ofiser d'an tetrark Philipp a deu d'he gaout evit he bedi da barea he vap a ioa t'c'hor e Kafarnaüm :

« Deuit buhan, emezha ; ema en he dremenvar.

« Ne gredoc'h ket eta morse, a lavar Jesus nemed burzudou a miraklou a ve great bemdez dirak ho taoulagad ! »

Mez ar paour keaz tad beuzet en he c'hlaç'har n'hen doa ket ententet ar pezh a rebeche dezho.

« Deuit, Aotrou, a lavare-hen adarre, araok ma vo maro va c'brouadur. »

« Kit d'ar gear, â lavar Jêsus dezha gat made-
lez, ho map a zo leun a vuez. »

An offiser a zistroas affo. Pell oa c'hoaz dioc'h
ar gear, pa gavas he zervicherien deuet d'he ziam-
brouk ha da zigass dezha ar c'helou oa he vap pa-
re klok.

« Var dro ped-heur eo bet ar vellaen, a c'houlén-
nas digatho an offiser ? »

« Vardro seiz heur, eo kuezet he dersienn. »

— Just ha just, d'ar seizved heur, Jesus hen doa
javaret : kit ; ho krouadur a zo leun a vuez. »
An tad, den a skiant, a velas ervad e zoa salver he
vap, Salver ive Israël. Kredi a reas e Jesus, hén
hag an holl dud euz he di.

Nebeud dervezioù goudeze, Jesus a zistroe da
Gafarnaüm ; hogen ne dea ket di da ehana. Rak
bep tro ma vije dastumet ar bobl er synagog, e rea
atao eur brezegen ha gounezet en devoa evel-se
kalz diskibien. Setu ama eun taol kaer great gat
hor Zalver hag a estounas kalz ar bobl.

E kear, e zoa eun den possedet gat an diaoul.
Hema a droe he zen e peb fessoun, evit diskuez he
c'halloud ha spounta an eneou. Dreizha e komze,
dreizha e rea peb tra hag avechou e lakea he blija-
dur d'he dourmanti dirak an holl, en eur fessoun
estranj. Goude m'hen dije her goal-gasset, e leze
gatha eun nebeudik ehan. Hema neuze a iea d'ar
sinagog assamez gat he vignouned. Eur zadorn-
vez, e klevas Jesus e prezeg rouantelez Doue. An
holl a zelaoue ar profed gat ar brassa evez, pa zi-
rollas an den possedet da ioual var eur vouez
truezuz :

« Jesus a Nazareth ! Lez ac'hanomp ! Petra or

beuz-ni da ober ganez ? A dont a rez ama d'hor
c'holl ? Me a oar piou oud. Te eo Sant Doue ! » Ar
bobl a ioa spountet. Jesus a reas eur zell var ar
possedet evit her gourdrouz :

« Peoc'h, emezha d'an drouk-spered, ha kuitait
an den-ze. »

Red mad oa d'an diaoul senti. Mez en hem venji
a reas var an den possedet ; he ruilla' reas dre an
douar ha goude e zeas euz he gorr en eur leusker
iouadennou ker spountuz ma zoa an holl strafillet.
Tud Kafarnaüm, leun a joa, a lavare entrezo :

« Petra eo eta ar relijion nevez-se a ro galloud
da gommandi, zo-ken, da sperejou an ivern ? »
Brud Jesus en hem skignas dre an holl vro.

En deiz-se, en eur zont euz ar sinagog, Jesus a
ieas da di Per hag Andre. Hogen mam-gaer Per a
ioa astennet var he guele, gat eun dersienn vraz.
An daou vreur a bedas anezha d'he farea. Jesus a
dosteas ouz an hini glañv hag a roas urz d'an der-
sien da dec'het kuit. Neuze e pegas en he dourn ;
e savas anezhi goustadik ; ha raktal houma, leun
a nerz hag a iec'hed, en hem laka d'ho servicha
oc'h taol.

Ar brud euz ar mirakl nevez-se a redas buhan
dre gear ha setu goude kuz-heol, pa oue echu re-
poz ar sabbat, e tigasser dezha a bep-tu tud klañv,
tud mac'haniet ha Jesus ho faree holl en eur asten
varnho he zaouarn. Eun toullad tud a ioa en dro
d'an ti. An diaoulou a iea euz a gorrvou meur a hini
en eur iudal : « Te eo map Doue. » Mez n'oa ket
sounet c'hoaz an heur d'hen hem ziskuez evit mad.
Setu perak Jesus a zifenne outho embann oa map
da Zoue, ar C'hrist.

VI.

AVIEL AR ROUANTELEZ.

DOUK ar c'henta beaj-se en doa great e bro Israël, Jesus en devoa prezeget e peb leac'h rouantelez Doue. Hano profed Nazareth a ioa anavezet gat an holl ha dougen a reat dezha c'hoaz muioc'h a respet eget da hano Iann-Vadezour. Mez mar doa ar Messias evel ma tliet kredi dioc'h he gomzou hag he viraklou, penaoz eta e telivro Israël euz ar sklavaj ha penaoz e savo-hen ar rouantelez neehan da gomz anezha? Poent oa da Jesus rei d'ar Juzevien sklerijen var ar poent-se ha deski dezho oa deuet da zével eur rouantelez kalz kaerroc'h ha brassoc'h eget holl rouanteleziou an douar-ma.

Goude eun nebeud sizunveziou tremenet e Kafarnaüm, an deiz goude m'hen doa pareet an den possedet, Jesus a ieas er meaz euz a gear mintin mad hag a bignas var eur menez distro evit komz eno gat he dad. Etretant, ar bobl mantret gat ar pez en devoa gullet en derc'hent, a vodas en dro d'he di hag a c'houlenne her gullet hag her c'hlevet. Per hag an diskibien all a ieas d'he glask.

« Ar bobl a zo aze e c'hortoz ac'hanoc'h, emint-hi.

— Red eo deomp mont, a respount Jesus, dre geriadennou ha dre geriou ar Galilee : rak prezek a dlean eno ar c'helou mad. Evit an dra-ze oun deuet. »

Gat ar vall d'hen hem gaout gat Jesus, ar bobl a ioa dija pignet var ar menez. Boda' rejont en dro dezha ha dre ho daelou hag ho fedennou e klaskent hen derc'hel gatho. Mez dezho ive e lavaras evel d'he ziskibien : « Me a rank prezeg rouantelez Doue. Evit kement-se e maoun er bed-ma. » Terc'het a reas eta dioutho ha mont a reas en hent.

Ar Galileaned o doa mall d'he velet. E peb leac'h e tirede ar bobl a bez d'he ziambroug, evit klevet he vouez hag ouspenn evit gullet he viraklou. Rak goude beza prezeget er synagog, e paree var an tachennou hag en tiez a bep seurt tud klañv ha mac'haniet. Ar brud anezha a ioa eat beteg ar Syrii ha zo-ken bete ar vro c'houez euz al Liban. Aliez e tirolle kement a dud d'he zelaou ma ne vije ket a blass aoualac'h er synagog. Neuze e prezege er meaz, var an duchen, en draonien. Goudeze e paree ar re glañv, an dud mac'haniet, an dud possedet, al loariadennet hag an dud seizet a vije digasset gat ar belerined.

Goude m'en devoue gullet ar Galilee penn-da-benn, e kerzas adarre varzu lenn Jenesareth. Mez ar vandennad diskibien a iea e peb leac'h d'he heul ne fellas ket dezho dispartia dioutha. Lod anezho a ioa euz ar Galilee, lod euz an Decapol, darn all euz ar Judee hag euz ar broiou en tu-all d'ar Jourden. Pa velas kement a dud en dro dezha hag a c'hoantea klevet c'hoaz he vouez, Jesus ne ellas miret da gomz outho araok distrei da Kafarnaüm. Pignat a

reas neuze var eur menez huel, tostik d'al lenn hag eno e roas dezho e berr gomzou he gelennadurez var rouantelez Doue.

Pobl Doue, evel ar Jentiled, ne glaske nemed traou ar bed-ma. Ar Pharisian a glaske enoriou ; ar Sadusean a glaske plijaduriou. Holl e c'houlennent aour hag arc'hant, zo-ken dre laeroni ha dre uzurerez. M'ar d'oa mall gatho kaout ar Salver, ne oa nemed evit gelloud en hem rei muioc'h a-ze d'ho zechou fall. E Jerusalem koulz hag e Rom, e vije kanet son an dud diskaret : « Eüruz ar re a zo er c'hargou huel, karget a enoriou hag a binvidigez ! Eüruz an den a gav he blijadur er bed-ma er festoù hag el libertinaj ! Eüruz an den gallouduz a laka an douar da grena ! Eüruz al laer en deus dastumet danvez divar goust an intanvez hag ar vugale emzivad ! Eüruz ar re a zo mistri er bed-ma, pa vezont zo-ken a eneb rouantelez Doue !

Jesus a gredas en hem zevel a enep son an dud-se ha divar gorre ar menez e kassas dre ar pevar roud avel ar c'homzou-ma a gleve ar bed evit ar vech kenta :

« Eüruz ar beorien a zo distag e guirionez dioc'h danvez an douar ; rak dezho eo rouantelez an Eñv.

« Eüruz ar re a zo douss ; rak an douar a vezo dezho.

« Eüruz ar re o deus naoun ha sec'hed euz ar justis, rak torret e vezo ho naoun hag ho zec'hed.

« Eüruz ar re trugarezuz ; rak great e vezo dezho trugarez.

« Eüruz ar re zo pur ; rak guelet a reint Doue.

« Eüruz ar re a glask ar peoc'h ; rak hanvet e vezint bugale Doue.

« Eüruz ar re a c'houzaon kalz poan evit ar justis ; rak dezho eo rouantelez an Env.

« Ia c'hui a vezo eüruz pa vezoc'h mallozet gat an dud, pa vezoc'h goal gasset gatho ; pa savint a bep seurt gevier en oc'h enep abalamour d'in-me. Bezit laouen neuze ; rak eur rekompans kaer a resevoc'h en Envou. Hag ouspenn, a ne ket evel-se eo bet ive ho tadou gat ar profeted ? »

Ar bobl a ioa mantret holl o klevet komz euz an eiz eürusdet-se a dremene bete neuze evit ken aliez a valloz. Ar Pharisianed, goude ar zetans douget a enep ho zechou fall, a zante oant bugale ar re o devoa lazet ar profeted. Hor Zalver n'oa ket eb gouzoud e vije deuet tud ar bed d'en hem zevel a enep he rouantelez. Setu perak e reas eur zell ouz he ziskibien muia karet a ioa en dro dezha hag e lavaras dezho freaz oant choazet gatha evit beza pillerou he di nevez :

« C'hui a zo, emezha, olen pe c'hoalen an douar. Mar tiouez d'an olen-ze beza goular, piou a roi dezha blas ? N'eo mad mui nemed da deuler er meaz ha da veza bresset dindan an treid. — C'hui eo, a lavar c'hoaz, sklerijen ar bed. Hogen pa vez elumet eul lampr ne vez ket lakeat dindan ar boezel, mez var ar c'hantolor evit ma roi sklerijen da dud an ti. Ra vezo bepred ho sklerijen skeduz dirak an dud evit-ma velint oc'h oberou mad ha ma rentint gloar d'an Tad pehini'zo en Envou. »

Goudeze, Jesus a zistro ouz ar bobl hag a ziskuezas sklear d'an holl n'oa ket lezennou Moizes, evel ma o doa c'hoant da lavaret ar Pharisianed trubard.

« Me ne deuan ket da derri al lezen, emezha, mez d'he miret penn-da-benn, betek al lizeren dis-

terra. An hini a dorr an disterra euz ar gourc'hemennou, pe a zesk d'ar re-all hen terri, a vezo an diveza e rouantelez an Envou. Hogen, an hini a viro ar gourc'hemennou hag a zesko d'ar re-all ho miret, ennez a vezo braz er rouantelez. »

Komz a ra goudeze euz ar gourc'hemennou-ze. Ar Pharisianed ne damallont nemed an oberou a zianveas. Mez, hen mestr al lezen, a boursu anezho beteg er galoun. Kondaoni a ra ne ket ebken allazerez, mez ar goler, an drouk-komzou, ar gassoni; ne ket ebken an aoultrij, mez an dezirou fall; ne ket ebken ar falz-toui, mez an toui eb ezom; ne ket ebken ar pezh a ioa a enep ar Justiss rigoriuz, mez kement a elle beza a enep ar garantez; hag e roe an aliou kaer-ma :

« Martiouez da unan bennak skei var ho poc'h deou, kinniguit dezha an hini gleiz. Ma vezit galvet e justiss evit tenna diganeoc'h ho sae, list ive ho mantel. D'an hini a fell dezha kaout diganeoc'h mil faz labour, roit daou vil faz all. Grit vad d'ar re o deus kassoni ouzoc'h ha pedit evit ar re ho koal-gass. Evelse, e vezoc'h bugale an Tad pehini a zo en Env hag a laka an heol da bara var ar re vad hag ar re fall. Ma ne garit nemed ar re a gar ac'hanoc'h, pe seurt kemm a zo etre c'hui hag ar baianed. Bezit parfed evel ma zeo parfet ho Tad pehini' zo en Env. »

Ar c'homzou-ze a zisplije dar Pharisianed. Mez ar pezh a lavaras Jesus varlec'h evit deski d'eomp penaoz, gat pe santimant e tleomp ober ar pezh a zo gourc'hemennet, a lakeas anezho e kounnar.

« Diouallit, emezha, da ober oc'h oberou mad evit beza guelet gat an dud; rak neuze ne rese-

voc'h rekompans ebed digat Doue. Pa rit an aluzen, ne dit ket da zini an droumpill evit ma vezoc'h guelet. An hipocrited a ra evel-se. Mez diouallit na ouesse ho tourn kleiz ar pezh a ro ho tourn deou. Pa iunit, arabad tenvalaat ho penn, evel a ra an hipocrited. Mez goalc'hit mad ho pizaj evit ne ouezden oc'h eus iunet. Pa bedit, ne dit ket ken nebeud evel an hipocrited, dre ar sinagog pe ar c'hroaz-hentchou mez pedit sioul en ho ti, ha Doue ho paeo. »

Neuze e tesk d'ar Juzeo avarisiuz, disprijout ar berniou aour a zastume divar goust ar paour dre an uzurerez.

« Na guzit ket, emezha, tenzoriou en douar evit ar mergl, ar prenvad, pe al laëron. Mez savit en eñv eun tenzor a ne vezo ket tennet diganeoc'h. E leac'h ema ho tenzor, eno ema ho kaloun. Rak ne c'heller ket servicha daou vestr assamez, Doue ha Mammon. (idol an avarisdet.)

« Ha ne livirit ket : penaoz e vezimp-ni guisket? petra or bezo-ni da zribi? Sellit laboussed an Env; ne adont, na ne eostont hag ho Tad pehini'zo en Env a oar ho maga. Ha n'oc'h ket mioc'h eget eul labouss. Sellit c'hoaz al lili er parkeier. Ne labour ket, ne nez ket; hogen, Salomon, e kreiz he c'hloar, n'oa ket guisket ker kaer. Mar reseo ar ieed euz ar parkeier digat Doue eur guiskamant ker kaer ha lezer a elfe ac'hanoc'hui eb guiskamant, tud a nebeud a feiz? Klaskit rouantelez Doue hag he justis. An traou-all a vezo roet d'eoc'h evel var ar marc'had. »

Goude beza diskuezet dezho varzu pe du e tleont en hem drei, Jesus a zesk dezho petra da ober evit

mont bete penn. Diskuez a reas dezho hon Tad, digor gantha he galoun bepred evit skuill he vadou var kement hini a bed.

« Goulennit, emezha, hag e resefot ; klaskit hag e kafot ; skoit var an or hag e vezo digoret d'eoc'h. Rak an hini a c'houlén a reseo ; an hini a glask a gav ; ha digoret e vez d'an hini a sko var an or. Mar teu ho map da c'houlén diganeoc'h bara, a rei a rit dezha eur mean ? A ma c'houlén eur pesk, a rei a rit dezha eur c'houil-krug ? Hogen, mar gouzoc'h, c'hui tud fall, rei traou mad d'ho pugale, penaoz ne roffe ket an Aotrou Doue ar guir vadou d'ar re ho goulénno digatha ? Pedit eta evel-hen :

« Hon tad pehini a zo en Env, ho c'hano bezet santifiet ; ho rouantelez deuet deomp ; ho polontez bezet great var an douar evel en env. Roit deomp hirio hor bara bemdeziek, ha pardonit deomp hon offansou evel ma pardonomp d'ar re o deus hon offanset ; ha na bermittit ket e kousesemp e tentasion : mez hon dilivrit diouz an drouk. Evel-se bezet great ! »

Goude beza diskuezet dezho penaoz e c'heller kaout ar guir vuez, Jesus a laka he ziskibien varevez oc'h doktored ar gaou :

« Diouallit, emezha, rak ar fals profeted-se a deu beteg ennoc'h gat guiskamant oanéd ha ne dint e guirionez nemed bleizi laer. Ho anaout a reoc'h dioc'h ho frouez. A kutuillet e vez rezin var ar spérn pe fiez var an drez ? Nan, eb mar ebed. Ar vezen vad a zoug frouez mad ; ar vezen fall a zoug frouez fall.

« Hogen ar vezen ne zougo ket a frouez mad a vo troc'het ha stlapet en tan. Kement hini a lavaro : Aotrou, Aotrou ; ne dei ket abalamour da-ze e rouan-

telez an Envou, mez an hini a ra bolontez va zad. Kalz tud a lavaro eun deiz : Aotrou, a n'or beus ket profetizet, lakeat an diaoulou da dec'het ha great burzudou en ho c'hano ? Ha me respounto dezho : Me n'oc'h anavezán ket ; pellait diouzin, miche-rourien an drouk. »

Neuze Jesus a ziskennas euz ar menez. Eun niver a dud a ziskenne assamez gatha bete kear. Setu, en eun taol, araok erruout gat dor kear e klefchot eur vouez gouez ha raoulet e krial a-bouez penn : « Diouallit, setu ama eun den lor. » Krial a rea evel-se evit lakaat ar bobl da ober hent dezha da vont bete Jesus. An dud a jommas a-za, spountet holl dirak ar spez euzuz-se, golet a c'houliou. Jesus a ieas beteg ennha :

« Aotrou, a lavaras an den lor daoulinet er bourtren, c'hui, m'ar fell deoc'h, a ell va fareá.

— Felloud a ra din, eme hor Zalver en eur asten he zaouarn a-zioud he c'houliou droulivet ; felloud a ra d'in : bezit pare. »


Kerkent an den lor a zo evel eun all en he blass. Ar c'hlenved a zo tec'het kuit eb lezer euz he roudou. Ar paour-keaz d'en-ze a ioa ker laouen ma zea a bep tu e touez ar bobl da splana oa bet parreet gat Jesus. Mez Jesus a roas urz dezha da devel.

« Kit, emezha, d'en hem ziskuez d'ar veleien evit ma reint testeni e zoc'h pare ha kinnigít en templ ar sakrifis a zo merket gat lezen Moizes. »

Kaer en doa bet Jesus lavaret dezha tevel, ar c'heaz den-ma, dre anaoudegez vad, ne c'helle miret da embann ar mirakl braz great evitha gat profed Nazareth. An holl a ioa mantret o velet deuet

ker iac'h, en eun taol, eur c'horfag a ioa araok er stad truezussa.

Kement-se a zo eur skeuden euz ar pezh a vezo great en eneo dre al lezen zantel prezeget gat Jesus.



VII.

AN DAOUZEK ABOSTOL.

Er brud a Jesus a ioa eat kement var gresk ma ne elle ket mont a vel er c'heriou kement a dud en hem zastume en dro dezha. Aliez, e prezege er meaz, en draonien, var ar menez. Deuet oa ar mare da gemeret re all d'he zikour hag a zesko gatha prezek rouantelez Doue.

Ne ket e touez ar re vraz, desket ha pinvidik, o c'hemeraz. Choaz a reas daouzek den eb deskadurez, traou dister ha n'oant ket, a dra sur, goest da zisput ouz beleien ha skribed Jerusalem ha Tiberiad. Var bord all lenn en doa kavet ar pevar genta : Per hag Andre, Jakez ha Iann. Tud a vor, e c'hounezent ho boued dre ar besketerezh. Eun devez m'o doa staget ho rouejou, Jesus a lavaras dezho : « Kit er mor doun ha taolit ho rouejou. » Nec'hellet ket kaout falloc'h poent evit pesketa ha Per a gredas lavaret dezha oant bet e douk an noz e pesketa, eb paka netra. « Gouskoude, a lavaraz-hen, var ho ker, ni a daolo ar roued. » Kement a besked a oue paket'ennha, ma oue leunet an diou vag, ken na vennt gueleidi.

« Aotrou, pellait diouzin, a lavar neuze sant

Per, spountet gat eun henvelep mirakl; rak me ne doun nemed eur pec'heur paour. — N'ho pezet ket aoun, a respountas dezha ar Mestr, iviziken e vezoc'h pesketaer tud. — » Ober a ra sin d'he bevar diskib hag e lavar dezho : « Deuit d'am heul. » Gounezet hag evel trellet gat grass Doue, ar pevar besketaer a zilezas ho bag hag ho rouejou, ho c'herent hag ho mignouned hag a ieas da heul Jesus. Ar c'henta ouent ato e touez he ebestel.

Ar pemped oue Philipp, ginidik euz Bethesda, evel Jakez ha Iann, bugale Zebedee. Philipp a ioa e c'heuil ar Messias abaoe ar penn-kenta moa komanset da brezek. Nathanael, he vignoun braz hanvet ive Berthele, hano he dad, an Israelit leal, a oue hanvet ar c'huec'hved.

Jesus a gemeras ar seizved e stal ar publikaned, var ribl al lenn. « Deuit d'am heul, » a lavaras dezha eur vech; ha Maze raktal a lezas he vicher evit beza diskib da Jesus. Rei a reas zo-ken, dre'n okazion-ze, eul lein vraz en he di ha pedi a reas ive Jesus hag he vignouned. Ar Pharisianed a gawe an dra-ze fall hag a c'hrosmole. « Petra ! emezho; Jesus hag he dud a ia da breja gat ar publicaned hag ar bec'herien ? »

« Ia-da, a lavar Jesus; rak me a zo deuet da c'hervel d'ar binijen, ne ket an dud santel, mez ar bec'herien. Ne ket ar re a zo iac'h eo o deus izom euz ar medesin, mez ar re glanv. Deskit e tal muioc'h ar garantez eget ar sakrifik. »

Ar choaz en doa great Jesus euz ar publikan a zitplije kalz d'an doktored.

Goudeze, Jesus a gemeras daou euz he dud nez : Jakez ha Thadee, bugale Cleophas, a ioa bet savet

assamez gatha e Nazareth, Simon, ozac'h eüruz Kana hag erfin Judas, euz Kerioth. N'oa ken Juzeo nemed hema e touez an daouzek. Hema en devoa klevet edo Jesus e yont da zevel eur rouantelez nevez. Troet varzu an danvez, e zoa douget euz ar re genta evit hor Zalver, abalamour ma sonje en dije Jesus, eur vech var he dron, roet a bep seurt pinvidigez d'ar re a vije eat d'he heul.

Goude beza dibabet he zaouzek abostol, Jesus a roas dezho ar c'halloud da brezek he aviel, da gass kuit an diaoulou, da barea ar glanvourien. Deski a ra dezho goudeze petra' dle beza guir micherour an aviel : « N'o pezo, emezha, nak aour, nak arc'hant, na sac'h evit ar veaj, na diou zae, na boutou, na baz; rak da bep micherour eo dleet he voued. Ma ne vez den d'ho tigemer na da zelaou ho komzou deuit euz an ti pe euz ar gear en eur ija var ho lerc'h ar boultren divar ho treid. Ho kass a ran evel oaned e touez bleizi. An dud a gasso ac'hanoc'h dirak an tribunal, ho skourjeza' reint er sinagog ha dre gas ouzin-me e zeoc'h dirak ho gouarnourien ha rouanez. Neuze, pa vezo deuet an dro da renta testeni d'in-me, ne glaskit ket komzou flour; rak ne ket c'hui mez Spered va Zad eo a gomzo ennoc'h. Pa vezoc'h goal gasset en eur gear, tec'hit en eun all. E guirionez, her lavaran d'eoc'h : no pezo ket prezeget an aviel en holl keriou Israël; ha dija Map an den en devezo vizitet he bobl. »

Adalek brema, goude prezek d'ar bobl, Jesus a zresse he zaouzek abostol evit al labour dispar a dlie fiziout enno.





VIII.

RENDAEL A BERZ AR PHARISIANED.

Ar Pharizianed, beleien ha doktored, ne velent ket eb goarizi ar bobl a-bez e trei gat profed Nazareth. Kaer o devoa kuzet dindan apparansou pinijen an techou fall euz ho c'haloun, Jesus ho dispake didruez dirak an holl. Ar miraklou a rea a roe nerz d'he gomzou hag abalamour ne gomze nemed euz eur rouantelez spirituel, an esperans o devoa da veza savet huel en eur rouantelez euz ar bed-ma a iea da netra. Rak fellout a rea dezho kaout eur Messias evit sevel, ne ket rouantelez Doue, mez ho rouantelez dezho ho unan. Jesus eta a ioa evitho evel eur goal adversour hag a ranket en hem zizober anezha kousto pe gousto. Setu perak e lakeant tud d'he heul e peb leac'h, evit teuler evez oc'h kement a rea pe a lavare ha klask eun digarez bennak evit her c'kass dirak tribunal braz ar Sanhedrin.

Goude beza great diou vech tro ar Galilee, Jesus a ioa distroet da Gafarnaüm evit tremen eno amzer ar glaoeier. Er sinagog ha var ribl al lenn, e prezege komzou Doue da dud kear ha d'an niver braz a zianvezidi a ioa deuet di. Pharizianed, skribed euz a Jerusalem hag euz ar Judee a deue benn dez da zisput outha. Eun dervez, m'edo e komz en

he di, ha ma zoa an ti leun kouch, pevar den a deuas eno, eun den seizet gatho var eur c'hravaz, hag a felle dezho kass beteg ennha. Evel ne ellent ket mont ebarz dre an or, e pignjont var an doen dre eur skalier a zianveaz ; tenna' reont an teol, diskenn a reont ar c'hlanvour divar bouez kerdign bete e c'harz treid Jesus.

Feiz an dud-se hag ho fizians ennha a blijas da Jesus. Mez gueleit a ra en deus ar c'heaz den-ze eur c'hlenved en he ene kalz goassoc'h eget klenved he gorv. Gat eur zell, e laka e kaloun an den-ze eur c'heuz braz euz he vuez fall ; ha, goudeze, e lavaras dezha : « Fizians, va map ; ho pec'hejou a zo pardonet. »

« Petra eme ar Pharizianed en eur c'hrosmolat ! ho pec'hejou a zo pardonet ! Setu a-ze eur blasfem. Rak Doue ebken en deus galloud da bardoni ar pec'hejou. » N'oa ken da ober nemed kass Jesus dirak ar c'honseil braz, tamallet da veza en hem c'hreat evel Doue. Hogen ar profed a vele ar pez a ioa en ho c'halon.

« Petra eo d'eoc'h, emezha, lezer da rodella en ho c'hene sonjou ker fall ? A diassoc'h eo d'in-me lavaret d'an den seizet-ma : « Ho pec'hejou a zo pardonnet ; » eget na deo d'in lavaret : « Savit ha kerzit ? »

An holl a ioa tro ho daoulagad gatho var Jesus : mez nikun ne grede lavaret grik. Neuze Jesus a boursu :

« Guelit eta brema, emezha, a map an den en deus var an douar ar c'halloud da bardoni ar pec'hejou. Savit, a lavar d'an den seizet ; me'ro urz d'eoc'h : Sammit ho kuele ha distroit d'ar gear. »

Raktal, e teu buez en izili an den seizet. Sevel a ra. Samma'ra he vele ha tremen a ra digatar dirak an holl, evit distrei d'ar gear. An holl, assamez gatha ha var eur vouez, a rente meuleudi da Zoue : « Test oump bet, emezho, euz eur burzud braz ha biskoaz n'or boa gullet kement all. »

Ar Pharisianed a dec'has lostek da c'hortoz kaout adarre an tu da ziskuez ho maliss. Goueliou Pask a ioa tost. Eno, e Jerusalem, e c'hesperent gullet Jesus ec'h ober pe lavaret traou a eneb lezen Moizes hag o devije dre-se kavet ar pleg varnha d'he gass dirak an dribunal. Kement-se ne viras ket ouz hor Zalver da vont d'an templ evit diskuez ar sklerijen d'an dud a deue di a viliounou evit goueliou Pask.

E kichen moger an templ, e tu an anter-noz, e zoa eul laouer-vraz, hanvet pinsin probatik, da lavaret eo pinsin an denved, abalamour eo eno e teuet da oualc'hi al loened a vije kinniget e sakrifis. Avechou, e vije galvet Bethesda. ti a c'hrass, abalamour d'he vertuz mirakuluz. Bep en amzer, eal Doue a ziskenne er pinsin-ze ; meska a rea an dour enna, ha goudeze ar c'henta den klanv a ziskenne en dour a vije pareet, peger braz klenved bennak en divije. Setu perak oa digasset eno kement a dud n'oa pare ebed evitho : tud dall, tud kam, tud seizet a ioa en dro d'ar pinsin e c'hortoz ma vije finvet an dour.

Hogen, en ho zoues, e zo eur c'heaz den seizet, paralizet, ha n'hen doa ket gellet finval eur mempr abaoue eiz vloaz ha tregont. Astennet oa var he vele ha den ne rea van anezha. Mez Jesus, leun a druez outha, a lavar gat dousder :

« A c'hoant ho c'heus da veza pare ? »

« Ia, Aotrou ; mez ne meus den da zisken ac'hanon er pinsin, pa vez deuet ar mare ; hag epad ma klaskan en hem ruza, eun all a ziskenn ebars em raok. »

« Savit, a lavar dezha Jesus raktal : sammit ho kuele ha kerzit d'ar gear. »

Ar paralitik en hem gav pare ; samma'ra he vele var he skoaz hag e zeas en hent. An holl a jommas sebezet.

An dra-ma a c'hoarveze d'ar zadorn, deiz a repoz el lezen goz. Ar Pharizianed o doa great var bouez miret an deiz-se lezennou rust ha zo-ken diot. N'oa ket oualac'h evitho difen labourat, mez difen a reant ouspenn dougen an disterra sam. Epad m'edont e pignat varzu an templ e veljont ar paralitik e tougen he vele var he skoaz.

« Hirio, emezho, eo ar zadorn ; n'eo ket permettet deoc'h dougen ho kuele. »

« An hini en deus va fareet en deus roet urz d'in ha me a zent outha. »

Ar Pharizianed lakeat nec'het-maro, a c'houlen digatha piou en deus her pareet. Mez ne ellas ket lavaret dezho piou oa ; rak Jesus a ioa tec'het ac'hano kerkent a m'hen doa great he virakl. Divezatoc'h e tistroas d'an templ evit trugarekaat he vadoberour. Jesus a dosteas outha hag a lavaraz dezha en he skouarn : « Setu c'hui pare ; na bec'hit mui gat aoun na ziouesse goassoc'h tro ganeoc'h. » An den-ze neuze leun a joa ha dre anaoudegez vad a embann a-bouez penn eo Jesus a Nazareth en doa roet dezha ar iec'hed. Neuze, ar Pharizianed a glask eno digarez evit tamall hor Zalver : « Petra eo dez-

ha, emezho, para tud hag ho lakaat da zougen ho guele, da zadorn? » N'oant ket var c'hed d'ar respount-ma a roas dezho Jesus. « Va Zad a labour bepred, ha me a labour evel dha. »

Dre al langaj-se e tiskueze sklear d'an holl e zoa Doue ha Doue evel an Tad. An dud fall a gawe abek enna abalamour ma torre lezen ar zadorn hag ive abalamour m'en hem c'hrea henvel ouz Doue. Meritet en devoa ar maro, hervez lezen Moizes. E leac'h distrei var ar pezh en devoa lavaret, Jesus a lavaras muioc'h c'hoaz. « Ar pezh a ra an Tad, emezha, ar Map her gra ive. Ober a rei a ben-nebeud dre he Vap traou hag o c'hestouno. Rak evel ma tigass an Tad ar re varo da veo, evelse ive ar Map a rento ar vuez d'an dud hervez ma plijo gatha. An Tad ne varn den; mez ar c'halloud da varn en deus roet d'ar Map evit ma teui an holl d'he enori evel ma enoront an Tad. »

Ar Pharizianed berbouellik a zeblante lavaret dezha: Ar Map Doue-ze a gomzit kement anezha, piou effhen eta? Respount a reas dezho sklear aoualac'h:

« E guirionez, m'her lavar deoc'h, an hini am ze-laou hag a gred en Hini en deus va digasset, hennez en deus ar vuez eternal. Ouspenn, ma vijen va unan o renti testeni ac'hanon va unan, ve zesteni ne dalfé netra. Hogen, unan a zo ag a rento bepred testeni evidon, hag enne ne ket Iann eo daoust gouskoude m'hen deus ive rentet testeni d'in; mez hennez eo va Zad. Ar miraklou en deus roet d'in ar c'halloud da ober dirazoc'h, a ziskuez sklear eo an Tad pehinizo en Env eo en deus digasset ac'hanon betek ennoc'h. Ouspenn-ze c'hoaz, studiit ar

skrituriou sakr pa zeo guir e kredit kaout enno ar zoursen euz ar vuez eternal. Ar skrituriou-ze a rent testeni d'in-me ive. Ne ket me eo ho tamallo dirak va Zad: an hini ho tamallo, a vezo Moizes he unan, an hini emae enna ho c'holl fizians. Ma kredfec'h stard e Moizes, e kredfec'h ennon-me ive. Rak divar va fenn-me eo en deuz komzet ha skrivet: »

An doktored ne gavent ket eur ger da zislavaret. Nec'het int, ha sonjal a reont er-vad e komzou Moizes: « Me a lakai da zevel en ho zouez eur profed henvel ouzoc'h. Lakaat a rin va c'homzou var he vuzellou, ha mar tieuez da unan bennak chomm eb selaou he gomzou, me, Jehovah, a venjo anezha. » Jesus en hem dennas kuit, eb m'en dije den kredet lakaat an dorn varnha.

Var vouassaat e zea atao kounnar he inimied. Ar re-ma a rea peb tra evit he baka e gaou pe e faot. Pa edo e tistrei da Gafarnaüm, goude goueliou pask, he ziskibien a zistagas pennou ed en eur park hag a zizille anezho en ho daouarn evit ho drebi goudeze. Buhan ha buhan, ar Pharisianed a grias var hor Zalver:

« Hirio ma ar zadorn; guelit penaoz e vir ho tiskibien an deiz se! »

— « A n'oc'h eus ket lennet eta, emezha, e zeas eun deiz David e ti an Aotrou Doue, dare gat an naoun hag e trebas gat he dud ar bara sakr kinniget da Zoue, a ne oa nemed ar veleien ag o dije konje d'hen dribi? Ar zadorn a zo great evit an dud ha ne ket an den a zo great evit ar zadorn. Ouspenn-ze, map an den a zo mestr da bep tra hag ive d'ar zadorn. »

Jesus ho diskare bep taol. Méz sulvui oant kan-

net sulvui a-ze o doa c'hoant d'he laza a daoliou mein. Eiz dervez goudeze, goude he brezegen er sinagog, eun den ag a ioa seac'h-gorn he zourn, a bedas anezha d'her para e vit ma c'hello labourat da c'hounid he vara.

Ar Skribed hag ar Pharizianed a glask trabass outha hag a c'houlén digatha : « Mestr, a permettet eo para d'ar zadorn ? » E leac'h respout dezho Jesus a lavaras d'an den klanv : « Savit ha chommit en ho sa e kreiz ar sinagog. » Neuze e lavar d'he dro d'an doktored :

« A permettet eo, mar plij, ober vad pe zrouk ; savetei ar vuez pe laza d'an deiz sadorn ? »

Ma lavaront *nan* e zeont a enep ho beleien a roe konje da labourat da zadorn evit savetei he vuez d'an nessa. Ma lavaront *ia* perak tamall Jesus abalamour ma para an dorn dizec'het. Ne gavas hini en ho zoues eur gomz da lavaret.

« Ne respountit ket, a lavar neuze Jesus. Mez piou ac'hanoc'h, mar kuez he oan er foz da zadorn, ne denno ket anezha euz an dour ? Gouskoude daoust ag eun den ne dal ket muioc'h eget eun oan ? Anzavit eta eo permettet ober vad da zadorn. » Ar c'heiz-tud-se a iea en hegar, dre ma velent ar bobl a-bez a-du gat Jesus. Hema neuze a lavaras d'an hini klanv a ioa e kreiz ar zal : « Astennit ho tourn. » An den-ze a astennas he zourn hag a oue paraet kerkent.

Adalek an deiz-se ar Pharizianed hag an Herodianed a ioa a unan evit goall-gass Jesus. Dija, evit plijout d'ar Pharizianed, Herodes en devoa lakeat Iann-Vadezour er prizoun. A ne c'hellet ket dastum ar profed gat he vignoun e prizoun Macheronte ?



IX.

TRIOMF AR PROFED.

SULVUI a gassoni o devoa ar Pharizianed oc'h Jesus, sulvui a-ze e karie ar bobl profed Nazareth. Ho c'homzou ne vezent ket selaouet, ha peb hini a lavare ne c'helle ket beza eur gaouiad an hini a brezege guirioneziou ker kaer, a roe konfort d'ar beorien hag a reakement a viraklou. Dre gement leac'h ma tremene, ne vije great anezha nemed Sant an Aotrou Doue, ar Messias promettet, Salver Israël. Ar Romaned ho unan, daoust dezho ma zoant paen, a ioa evel gounezet gat an den-ze, ne oa henvel euz hini all er bed-ma.

Pa zistroas Jesus da Gafarnaüm goude goueliou Pask, eun offiser romen, o velet unan euz he zervicherien en he dremenvan, a bedas lod Juzevien euz he vignouned da vont da gaout Jesus evit ar c'hlanvour. « Karet a ra hor bro, a lavare ar re-ma d'hor Zalver. Savet en deus d'omp eur sinagog divar he goust. Plijet ganeoc'h para he zervicher. » Jesus a zelaouas ho feden hag a reas van da vont assamez gatho. Mez an offiser, deuet d'hen diambrouk, a lavar dezha :

« Aotrou, me n'oun ket din e teuffec'h em zi ;

lavarit eur gomz ebken hag an hini klanv a vezo pareet. Me ne d'oun nemed eun offiser dister ha gouskoude pa goumandan d'am zud, kerkent e sentont. »

Hervez ar paien-ze, ar c'hlenved a dlie tec'het var eur gomz a-berz Jesus, evel ma sente ar zoudard var ger he vestr.

« E guirionez, a lavaras ar Zalver, ne meus ket kavet kement a feiz en Israël. Her lavaret a ran deoc'h, dont a rei kalz tud euz ar sao-heol hag euz ar c'huz-heol da gemeret perz er fest dudiuz gat Abraham, Isaac ha Jacob, e rouantelez an envou, epad ma vezo bugale ar rouantelez taolet en denvalijen, el leac'h ma vezodaelou e-leiz ha strakerez dent. It, emezha d'ar c'hantener; it, ha ra vezo great deoc'h ervez ho koulen. »

Pa erruas an offiser er gear e kavas he zervicher pare ha ne jomme ket varnha an disterra merk euz he glenved.

Nebeud amzer goudeze, eur mirakl brassoc'h c'hoaz a lakeas ar bobl holl sabatuet. Jesus a ioa e vont gat he ziskibien e kerik Naïm pa erruas gatha eur c'horv maro hag e rankchont chomm a-za. Edot e kass d'an douar eun den iaouank, mab unik da eur c'heaz intanvez. Kalz tud a iea da heul an arched dre dreez ha dre garantez evit ar vam gla-c'haret. Pa velas Jesus ar c'hreg-se beuzet en he daëlou, e tosteas outhi hag e lavaras dezhi gat dousder : « Greg, ne ouelit mui. » Mont a ra neuze betek an arched, touch a ra outha gat he zourn hag e ro urz d'ar re a ioa e tougen ar c'horf da jomm a-za.

An dud, sioul, ho daoulagad e para var ar pro-

fed, a glaske divinout petra' vije c'hoarvezet. Etretant, Jesus, var eur vouez huel a lavar d'an hini maro : « Den iaouank, me her gourc'hemen deoc'h « *Savit.* »

Ha setu raktal an hini maro a zao dirak an holl hag a en hem laka da gaozeal. An dud a jomm mantret ; mez pa veljont Jesus e pega e dorn an den iaouank evit he gass beteg he vamm, an holl a zirollas da grial, ken a dregernie ar me-neziou tro-var-dro :

« Gloar da Jehovah ! emezho, eur profed braz a zo savet en hon touez, ha Doue en deus abalafin sellet a dreez ouz he bobl. »

Ar brud euz ar mirakl-ma a i eas buhan dre an holl vro. Setu perak euz a bep korn e tirede tud evit guelet an den burzuduz-se ha kalz konversionou a vije bemdez. E touez diskibien Iann-Vadezour, e zoa meur a hini ag o doa diegi e vont da heul Jesus. Kaer en devoa Iann, euz goeled he brizoun, lavaret dezho oa perachu he labour abaoe ma zoa deuet ar Messias, ne felle ket dezho gouskoude anaout profed Nazareth evel ar Messias Salver Israël. Evit dont a-benn anezho Iann a gas-sas kannaded beteg hor Zalver.

« It da gaout Jesus euz va ferz, a lavaras da zao anezho, ha goulennit kement-ma digatha : « Ha c'hui eo an hini a dle dont pe-chomm a dleomp var c'hed d'eun all ? »

An daou gannad a erruas e Naïm d'an ampoent m'edo Jesus e kelen ar bobl, en dro dezha eun niver tud klañv, dall, kamm, seizet a ioa digasset di gat tud vad deuet da glevet komzou ar Messias. Goulen a reont digatha en hano prizounier Mache-

ronte hag hen oa e guirionez an hini oa Israël var c'hed dezha. Ne c'hellet ket rei dezho kaerroc'h respount eget an hini a roas Jesus. Da genta, e pareas kement hini klañv a ioa en-dro dezha ha neuze e lavaras da ziskibien Iann :

« It da lavaret d'ho mestr, emezha, ar pezh oc'h eus klevet ha gullet : an dud dall a vel sklear ; ar re gamm a gerz eeun ; an dud lor a zo pareet ; an dud bouzar a glev ; ar beorien a reseo an aviel hag ar re varo a deu da veo ! »

Gullet a reant e tiouzout dirazho ar pezh en devoa lavaret guehall ar profed Isaias. « Neuze, emezha, daoulagad ar re zall a zigoro, ar re vouzar a glevo. an den kamm a lammo evel eur c'havrik ha teod an dud mut a vezo distagellet. » Diskibien Iann a velas ervad oa dirazho eur profed braz. Jesus ive a gavas an tu da ober meuleudi he Vadezour.

« E guirionez, m'her lavar deoc'h, emezha, n'euz ket savet e touez bugale an dud, brassoc'h profed eget Iann-Vadezour. Gouskoude var he lerc'h e zeus deuet unan e rouantelez Doue ag a zo brassoc'h evitha. Betek Iann, an holl brofeted o deuz komzet euz a rouantelez Doue, da zont. Hirio ar rouantelez-se a zo deuet ha savet. Peb hini a c'hell kemeret he blass ennh. »

Jesus, dre he gomzou, dre he viraklou, a ioa ker mad deuet gat an holl, ma oue pedet zo-ken gat eur Pharizian da breja en he di. Hor Zalver ne glaske nemed an dro da instrui ha da barea hag a ias da leina da di Simon.

Hogen, e Magdala, bourkig koant, tost da Naïm, oa e chomm eur vaouez brudet, siouaz ! dre an di-

zurziou euz he buez. Mari oa he hano ; mez les-hanvet oa bet Madalan abalamour m'edo e chomm e Magdala. Ginidik oa euz a Vethanii, er Judee, ha c'hoar d'an dud santel Lazar ha Martha. Mez abred e tec'has euz ar gear evit en hem rei d'he zechou fall, pell dioc'h kentelioù ha rebechou he breur hag he c'hoar. Jesus a anaveze istor ar plac'h paour-ze. Rak evit 'goueliou pask e tiskenne e ti Lazar, e Bethanii. Mari a anaveze anezha ive abaoe m'oa bet e selaou he brezegennou o devoa roet dezhi kement a enkrez. Seiz diaoul lojet ennh abaoe pell amzer, a gemeras an teac'h kerkent a ma veljont Jesus. Adalek neuze, Mari a ouele dourek var he fec'hejou hag a glaske an dro da vont betek hor Zalver evit diskuez dezha he anaoudegez vad. Pa glevas edo e Naïm, e ti ar Pharizian Simon, e zeas er zal hag eno evel eur bec'herez glac'haret en hem strink e c'harz treid he Mestr divin. Goalc'hi a ra he dreid gat he daëlou hag e sec'h anezho gat he bleo ; poket a ra dezho ha varnho e skuill eur podad louzou a c'houezvad. »

O velet kement-se ar Pharizian, a zao en he galoun disprijans evit Jesus : « Ma vije bet hema e guirionez eur profed, a zonje ennh he unan, n'hen dije ket permettet d'ar berc'herez lor-ze touch ouz he dreid. » Mez Jesus a vele ar santimantchou a rodelle e penn ar Pharizian hag a lavaras dezha :

« Simon, me' meuz eur gomz da lavaret deoc'h. »

« Komzit, Mestr. »

« Eur prester-arc'hant en devoa daou zleour : unan a dlîe dezha pemp kant diner ; egile, anterkant. Evel n'o doa ket-pe adra da baea, ar mestr a

reas anezho ho daou kuitez. Pehini anezho a gav deoc'h a garo anezha ar muia ? »

« Michans, an hini a zo bet muia pardonet dezha.

« Guir a livirit, Simon ; mad ; brema evesañt ouz ar vaouez-se ha guelit : Pa zoun deuet en ho ti, c'hui n'oc'h eus ket roet a zour d'in da voalc'hi va zreid hag houma a voalc'h anezho gat he dañlou hag ho zec'h gat he bleo ; n'oc'h eus ket roet d'in ar pok a beoc'h, hag houma ne ehan da boket d'am zreid ; n'oc'h eus ket skuillet a oleo var va fenn, hag houma e deus taolet var va zreid eur podad ongant a briz. Kalz pec'hejou-a zo pardonet dezhi abalamour e deus kalz karet. An hini a zo nebeutoc'h da bardoni dezha, a gar ive kalz nebeutoc'h. »

Neuze e tro varzu Madalan, atao daoulinet e c'harz he dreid hag e lavar dezhi : « Ho pe'chejou a zo pardonet. » Ar Pharisianed ne c'houzanvent ket ar c'homzou-ze. « Petra eo an den-ma, a lavarent-hi en eur c'hrosmolat, en deus var he veno ar c'halloud da bardoni ar pec'hejou ? » Mez Jesus a lavaras d'ar vaouez : « It e peoc'h ; ho feiz he deus ho saveteat. »

Jesus o velet ar bobl ken-troet varzu ennh a zonjas ober eur bale dre an holl vro, gat he zaouzek abostol. Prezek a rea rouantelez Doue dre ar c'heriou, ar bourkou, eb m'hen dije an disterra ne c'hamant var bouez ar bevans. Rak eur gompagnunez gragez santel, Mari Madalan, Jeanne Chuza, greg mevel braz Herodes, Suzanna ha kalz re-all a bourvee anezha a bet tra.

Pa deuas an diskar-amzer, goude beza ehanet epad eun nebeud miziou, Jesus a ieas adarre da

brezek var bord al lenn. Euz ar c'heriou divar-dro e tiredas kement a dud ma renkas pignat er vag evit komz dezho euz a rouantelez Doue. Deski a ra dezho dre barabolennou kaer e zeo komz Doue he rouantelez en eneo. Doue eo a ad ar c'hreunen-ze. Mar tioues dezhi kueza var an hent, pe var ar garrek, pe e touez ar spern, ne zougo netra. Red eo dezhi kaout douar mad evit dougen pennou till. Evel-se ive, komz Doue evit rei frouez a rank kueza en eun ene digor mad evit he reseo. Avechou, an adversour a deu da ada draok e park an tad a famill, ha neuze an draok a voug ar guiniz. Evel-se ive, e teu an diaoul da ada gevier e kalon bugale Doue.

Doue en deus taolet he roued evel eur pesketaer : hag, evel hema ive, pa vez leun he roued e tenn anezha var an teven ; dispartia a rai ar re vad diouz ar re fall ; hag ar re-ma a vo stlapet en eur fournier a dan. Eno e vezo forz dañlou ha strake-rez dent.

Jesus a fellas dezha mont da velet bro ar Jerasianed en tu-all d'al lenn. Mez a veac'h edo er vag gat he ebestel ma savas eur bar amzer spountuz. An tarsiou dour a skoe gat kement a err ouz ar vag hag a laoske kement a zour ennh, ma venne, bep moment, goueledi. Jesus a ioa kousket-mik, epad ma krede ar re-all oa great gatho. « Mestr, a leverjont spountet-holl, saveteit eta ac'hanomp : Rak emamp e vont da goll. » Jesus a zavas. Gourdrouz a reaz an avel hag ar mor, hag e roas urz dezho da devel. Kerkent, eo torret ar bar-amzer hag al lenn a deu sioul ha flour. « Tud a nebeud a feiz, a lavar Jesus, perak oc'h euz-hu aoun ? »

Mez ar re-ma, mantret, a lavare an eil d'egile :
« Petra eo an-den-ma, a zent outha an avel hag ar mor ? »

Antronoz vintin, e touarjont en Decapol, e tñ ar sao-heol d'al lenn. E kichen Jerasa, e teuas betek enna eun den possedet gat an diaoul, ken droug ma ne elle den dont a-benn anezha. Pa vije bet gellet he staga, e torre he liamou hag e zea er c'havagnou ha var ar menezioù da iouhal ha da grial skrijuz. Kerkent a ma velas Jesus, e tiredas d'hen hem deuler e c'harz he dreid.

« Jesus, map d'an Holl-Galloudek, emezha, petra' glaskes ober d'in-me? Perak out-te deuet ken abred da ober d'in kement a boan ? »

« Pe hano a c'heuz, a c'houlennas ar Zalver ? »

« Va hano-me a zo leñion, rak eun-toullad diaoulou e maomp ama. Mez ne gass ket ac'hanon ac'han ha n'am c'hass ket d'an ivern. Mar tleomp mont er meaz euz an den-ma, ro deomp konje da vihana da vont en torrad moc'h-se. »

Daou vil euz al loened-se a ioa e peuri var ar menez. A veac'h en devoa lavaret dezho Jesus : « It, » ma saillont var al loened-se ha ma treinjont anezho betek al lenn.

An den possedet a ioa pare-mad hag a bede hor Zalver da rei konje dezha da vont d'he heul.

« Nan, a lavaras dezha ar Zalver; mez it d'ar gear, ha lavarit d'an holl an traou kaer en deus great evidoc'h an Aotrou Doue, dre drugarez. »

Hema ne vankas ket da embann, e Jerasa hag en Dekapol, en devoa Jesus trec'het an amzer-fall hag ar maro ha lakeat da dec'het eul leñion a ziaoulou.

Euz a Jerasa, Jesus a deuas var vag bete an tu

kuz-heol d'al lenn. Ne c'helfet ket lavaret peger kaer digemer a oue great dezha eno. An dud a zonje ne elle ket beza saveteet eur vag ken dister dre eun amzer ker rust. Pa oue lavaret dezho oa bet diskaret an amzer fall ha reizet ar mor dre c'halloud ar profed, e ouent sebezet ha douget muioc'h evit hor Zalver. Epad m'edo e komz ouz ar bobl, unan euz pennou braz ar sinagog, he hano Jair, a deuas d'her pedi da zont d'he di da barea he verc'h pennerez, e doa daouzek vloaz hag a ioa e vont da vervel.

Jesus a ieas assamez gatha ha gat he ziskibien hag eun niver braz-all a dud.

Kaout a reas, var he hent, eur c'heaz maouez ag a ioa gat an divouada, abaoue daouzek vloaz. E kaout kalz medesined oa bet, dispignet e doa kalz a louzeier hag e leac'h beza pare nemed falloc'h ne oa. Ar zounj-ma a deuas en he spered : mar gellan, emezhi, touch netra nemed touch ouz sae Jesus, me a vezo pare. En hem zila' ra eta e touez ar bobl; tostaat a ra ouz Jesus eb beza gullet; ne reas nemed touch goustadik bord he vantel. Kerkent, an divouada a baouezas. Peger laouen n'oa ket ar c'hreg-ze da veza pareet ker buhan. Hogen Jesus a zistroas varzu ar bobl a ioa oc'h he heul hag a c'houlennas piou en doa touchet outha. Den ne lavare grik. Per hag an diskibien all a dosteas outha neuze hag a lavaras dezha : « Mestr, kement-all a emgroaz a zo en dro deoc'h hag e c'houlennit piou en deus touchet ouzoc'h ? »

— « Unan bennak en deus touchet ouzin gat sonj vad : ha gouzoud a ran e zeus eat ac'hanon eur c'hrass burzuduz. »

Sellet a rea ouz ar re a ioa var dro dezha evit guelet piou en doa touchet outha. Ar c'heaz greg a velas er-vad ne c'helle ket chomm kuzet mui ha setu hi d'en hem deuler e c'harz treid Jesus hag o lavaret dezha ar virionez penn-da-benn.

« Bezit fizians, va merc'h, a lavaras dezhi; ho feiz e deus ho saveteet: »

Ne oat ket pell mui dioc'h ti Jaïr, pa deuas lod euz he zervicherien d'he ziambrouk, da lavaret dezha oa maro he verc'h ha ne dalie ket eta ar boan lakaat ar Mestr d'en hem skuiza evit mont beteg eno. Hogen Jesus a lavaras d'an tad glac'haret: « N'ho pezet ket aoun; mez kredit stard hag ho merc'h a vezo pare. » Erruet e dor an ti, ne roas konje da zen da vont ebarz nemed da Ber, Jakez ha lann, ha d'an tad ha dar vamm. E diabarz an ti ne oa nemed kaoñ, muzisianed a rea muzik kaoñ; ouelerezed da lavaret eo merc'hed paet evit noz-veilli, lenva, hirvoudi, a iouhal.

« Perak, eme hor Zalver d'an dud-se e kaoñ, kement a hirvoud hag a drouz. Ar plac'h-se n'eo ket maro; n'eo nemed kousket. »

An holl a zirollas da c'hoarzin goap dezha. Rak gouzoud a reant oa maro mad. Jesus a reas dezho mont er meaz. Neuze e zeas e kampr ar plac'h iaouank gat he zad, he mam, hag he dri ziskib. Kregi a ra e dourn skournet an hini maro hag e lavaras dezhi gat eur vouez krenv: « Plac'h iaouank; me her gourc'hemenn d'eoc'h, savit! » Kerkent ar plac'h iaouank a zavas hag a gerzas. Var urz Jesus, oue digasset dezhi da zribi hag he trebas ken na oue mantret he zad hag he mam ha ma o doa mil boan e kredi d'ho daoulagad.

Setu penaoz e c'hechuas eil blaveziad prezegen-nou Jesus. Adalek Dan bete Bersabee, n'oa ken komz nemed euz a brofed braz Nazareth hag an dud a c'houlenne a n'hen dije ket lakeat prestik he c'halloud da zével en he za rouantelez diskaret Israël. Allaz! kaer en doa bet Jesus poania d'ho c'helen an dud-se n'o doa ket c'hoaz desket pe zoare rouantelez oa deuet da zével ha var pe zoare tiron e thie pignat evit savetci he bobl hag ar bed.





TAOLEN.

	PAJEN.
I. Iann-Vadezour	5
II. Jesus a Nazareth	11
III. Ar Profed er Judee	18
IV. Ar Profed er Samarii.	23
V. Ar Profed er Galilee	28
VI. Aviel ar Rouantelez	34
VII. An daouzek abostol	43
VIII. Rendaël a-berz ar Pharizianed.	46
IX. Triomf ar Profed	53

